

Abad AR MAY.

Buhe ha Merzerinti
Santez Barbon



SANT-BRIEK

TI MOULEREZ SANT-GWILHERM, BALI CHARNER

1904

38186

Abad AR MAY.

monnaie
juin
1896

Buhe ha Merzerinti Santez Barbon



fb
891-
682
LEN

SANT-BRIEK
TI MOULEREZ SANT-GWILHERM, BALI CHARNER

1904

KENTA LODEN

Diocèse de
Quimper & Léon
Evêché de Cornouaille

Document numérisé en 2016



BUHE SANTEZ BARBON

Guerc'hez ha Merzerez.



SANTEZ Barbon a zo anawet a bell-zo e-touez ar gristenien. Hi a verit karante ha fians euz o ferz, rak derc'hel a ra eur renk uhel er baradoz, hag an iliz a c'houll ma vo enoret braz war an douar.

Hi fedi a reomp d'hon dioual ouz an tan-goal ha diouz ar gurun. Digant-hi e c'houlennomp ive ar c'hras da zakramanti e stad vad arog mont da varnedigez an Autrou Doue. Choajet eo bet da batronez gant ar ganonerien, ar vengleuërien ha gant holl ar vécherourien a implich poultr en o labouriou : Rak ar rummadou tud-men a vê en dare pe riskl da goll o buhe dre eur maro souden pe re brim.

Hervez histor ar verzerien kentan, ar zantez-ma oa genidik euz ar gær a Nikomedi, pe deuz eur c'hartel peurdost d'ar gær-se, en Azi-vihan han-veet bro ar Zav-hêol. He merzerinti a erruaz didan gouarnamant Maximin, impalaër a Rom, wardro ar bloa daou c'hant pemp ha tregont goude done-digez hor Zalver Jezuz-Krist. Kement-se oa epad ar c'huec'hved persekusion. Pa yarvaz ar Zantez evit he feiz, n'hê doa ket ouspen triuec'h pe naontek vloa. Mæs dirag Doue, an oad a ve niveret, nan dre ar bloaziou, dre ar vertuioù, hepken hani vê ha dre ar zantelez euz ar vuhe.

Tad Barbon, é hano Dioscor, a oa eun dijentil pinvik ha gallouduz en é vro, eun den terr ha kri ouspen, douget-holl evit an douëou faos. He mam, hervez eur greden, a oa eur juzêvez gounêet d'ar lezen gristen, hep goût d'he fried. Lod-all a gred e oa hi paianez evel Dioscor hag ivez a renk uhel : N'euz ket mann diout-hi a-hend-al e buhez he merc'h santel.

Dioscor a gare Barbon dreist-muzul, egiz ma kar eur leon é re vihan, da laret eo, gant oaziri. Darempred ebet evit ar verc'h iaouank ouz kerent, na mignonezed, na konsortezed. Dalc'het e oa dre urz he zad en eun tour groet fetepanz evit-hi : Eno hi a veve, henvel euz eun ermitez, dispartiet diouz ar bed ha kuzet ouz daoulagad an holl. Dre gement-se, Dioscor an noa kredet bout mestr war he buhe, rak an tour a oa didostabl a bep tu ha goarnet mad noz-ha-de. Tro-var-dro d'han oa eur verjez gant magoriou kloz, lec'h hetabl epad an haon, rak enhan Barbon a gave bep seurt frouez

c'huek, bep seurt bokedi kaër ha dishêol ar guê délyek. — Groet en noa Dioscor e kenver é verc'h evel ma vê groet d'eur blanten kizidik pe d'eur fleuren dener lakêet e goudor euz an avel, euz pep goal-amzer, evit miret d'hê o sked hag o flourder. Klevet en noa komz euz Doue ar gristenieff, mæs petra benak ma voa an Doue-se dianaw evit-han, é zonz, dreist-holl, a oa miret ouz Barbon d'en em ober kristenez. — Dre chans, avechou zonz an den na zeu ket bepred da wir. Eur mestr a zo hag an neuz béli war ar vugale arog an tadou hag ar mammoù o-hunan, — Eur mestr deuz pehini Dioscor, pegén jalouz ma oa, ne hallaz ket kuzet é verc'h : ar mestr-se eo Doue. Ia, Doue a gemeraz kalon Barbon, evit-hi da vout alc'huêet en he zourel ha pellaet diout-hi an holl dud nemed eun neubeudik zervijerien. Kentoc'h eget lezel eun ene d'en em goll, mar vê c'hoantuz an ene-se d'Hen anaout, Doue a ra bep seurt burzudou : Nitra ne vir ouz é c'hras da vont beteg ar lec'h a fell d'ei tiout.

Dre ma oa paian, ha paian aheurtet, Dioscor na c'houlle ket e vize é verc'h dizhenvel diout-han en he c'hreden. C'hoant an noa koulskoude gober diouz Barbon an desketan plac'h iaouank a Nikomedi hag, hi lakât e stad da blijout dreist d'an holl verc'hed-all e pep feson. Dre'n abeg da gement-se, evithan bout evesabl warnei, hen a zibabaz tud gouziek e pep tra hag o c'hargaz d'hi c'helen war an holl skianchou a studjet er maré-sé.

Barbon he doa eur galon eun hag eur spered lemm. Dizolei a reaz buan faussoni ar baianaj.

N'helle kompren e vize enoret, vel douéou, tud bet guechall war an douar hep vertuz pe tollet memes lod anhê d'ar goassan dizurzhou. En he sonj ne dleê bout nemed eun Doue hepken, mestr war gement tra zo holl : An Doue-se n'en doa zi na tec'h fall ebet evel an Douéou paian ; peguir oa Doue, red oa e viche gallouduz, mad, zantel, parfet e pep doare. Hen hepken a verite bout doujet, enoret, karet, pedet gant an holl grouadurien.

D'an ampoent ma klaske merc'h Dioscor ar guir sklerijen evit he spered, eun doktor hanyet Orijen, brudet meurbed d'ar bed katolik, a drec'he 'mesk an doctored-oll dre é lokans souéuz ha dre é c'houiedigez hep par. Orijen a oa kristen : hervez eur gréden, Barbon a glevaz komz anhan hag a gassas d'han eur lizer dre unan eus he servijerien. Orijen n'helle dont betek ar lec'h e pehini oa dalc'het ar plac'h iaouank : An tad an dize groet hen pellât diouz an tourel, mæs hen a gassas unan euz é ziskiplad, ar beleg Valens da gaout Barbon. Valens a oa digemeret evel eur medicin, e-touez ar mistri-all karget d'hi diorren. Mæs ouspen diski d'ei vertuiou bep seurt louzeier, hen hi sklerijennaz war mysteriou ha guirioneou ar lezen gristen hag a roaz d'ei ar vadiziant.

Pa 'noa Barbon anawet ar guir Doue, hervez he menoz, e savaz en he c'halon ar zec'hed eus é garante. En he c'hoant e oa bout holl d'an Hani hepken a oa goest d'hi c'hontanti er bedmen ha d'ober hec'h eurusted er bed-all. Mare pe vare, ar zec'hed misteriuze-se a ziuuan peur-

vuian en eneu glann ha na gavont war an douar nemed dienez ha melkoni elec'h ar boneur hag an diduel o deffe bet hunvrêet.

A c'houde neuze Barbon en em c'hloëstraz da Zoue korf hag iné, hag ar mestr mad-se hi gualc'haz a beuc'h, a joasted, hi diouallaz ouz pep hirnez hag ouz pep nec'hamant, daoust d'ei bout dalc'hê adreon magoriou an tourel roet d'ei evit prizon.

Goarnet mad e vê ar pezh a fier e Doue. Setu eur wirione ankouéet re alies gant kalz a gerent, hirio-en-dê muioc'h martreze evit biskoaz. Lod anhê ne c'houllont ket rei o bugale da Zoue da c'hoarn a briz ebet. Lod-all, siouaz ! a zouj muioc'h evithê mestroni an Autrou Doue eget ne zoujfant ar maro. O na dallentez ! Petra vo ar vugale-se zavet ha desket hep lezen Doue d'o ren ha d'o sturia ? Kazi zur e veint kastiz o zad hag o mam dre an dismegans a dolleint warnhê, dre an direspé a ziskoeint en o c'henver. Pelec'h nemed e zervij Doue e kaver peuc'h ha zantimancho mad ? Pere vo ar vugale, nemed ar re a gar Doue, gement a garo o c'herent e guirione hag a vo prest ato d'o zikour ha d'o c'honforti. Komprenit eta, kerent diaviz, penos pell deuz Doue n'euz war hent ar vuhe nemed morc'hed ha rangalon, da c'hortoz, allaz ! poaniou diremed ar bed all.

II

Kelennet evel ma oa, Barbon a zeuas kent-pell da vout dreist pep meulodi dre he furnez ha dre

he deskadurez. Neuze gened hec'h ene, o para war he fas hag en he daoulagad, evel en eur melleour skler, a ree diouthi unan euz ar merc'hed parfetan e pep doare. Ken koant e oa a gorf, ken glan a ene ma verite bout galvet, hervez ma larer avechou, eur c'hoar d'an Eled kaer euz ar baradoz.

Dioscor, fougou enhan gant spered ha bravente é verc'h, an noa zonjet hi dimezi da eun dijentil a lignez uhel hag an noa madou braz. Mæs pa ziskuliaz ar zonj-se da Varbon, hen hi c'havaz troet en eur zonch-all. Na dre gaer na dre haeg ne c'hellaz ober d'ei kemer ar pried choajet gantan evit-hi. An dinac'h-se a oe kaled evit-han. Na lezaz den koulskoude da welet pegement e oa drouk-kontant : War zigare soursial euz é zanve, hen en em lakaz en hent da vale bro, epad eur maread amzer. Kredi a ree kaout d'an distro zantimant é verc'h soupléet hag essoc'h da blega d'é hani.

Arog kuittat, e c'houre'hemennaz d'é zervijerien zenti diouz Barbon e pep tra ha dioual mad d'ober d'ei eun disteran poan. Ouspen hen a reaz sevel eviti, e-harz troad he zourel, eur zâl-korronchou pe eur lec'h da gibella (*salle de bains*). Evit-se en noa groet digas dour-red eur sterik splan a-dreuz ar verjez, hag hen hinchu dre gaoniou beteg meur a gôm marbr aprestet er zâl kenedus-se. Ar lec'h-se, leun a freskadurez, a oa zur eun demeuranz hetus evit tremen an amzer : Daou breneñt hepken a roe sklerijen enhan ; Barbon a gemennaz digori eun driven, evit ma vize bet

unan en enor da bep person euz an Drinted santel.

Eno hi a renaz neuze buhe gwir zervijerien Doue, he sonj troet noz-dé war-zu an env hag he c'halon birvidik dre garante evit he mestr hag he Salver. Kredi a ree dalc'h-mad e vize Jezuz o veva ganthi hag o chom en he c'hichen. Evelse ar zuniou, ar miziou a dremene founus, ken founus ma ne zante na hirraz na digonsol da vout hec'h unan : En em blijout a ree kentoc'h en hec'h ermitaj, rak Jezuz, o respont d'he c'harante hag o chelaou deuz hé hirovoudou, a brije ganthan en em ziskoez d'ei a vare da vare.

Eur vech, ar Zalver, e doare eur c'hroëdurik bihan, en em lezaz da yout douget etre hé diou-vrec'h, evel guechall e Bethléem gant ar Werc'hez Vari, é vam benniget. Pebeuz joa evit Barbon ! Hi hen stardaz war hé c'halon gant trid ha tene-ridigez. O sonjal, varlerc'h, o envori pe seurt gras burzudus hi doa bet gant he mestr muiakaret, hi a gane kanaouennou ha gwerziou henvel ouz ar re a ganomp-ni breman da c'houeliou an Nedelek : ar gwerziou ha kantikou-se a zilampé deuz nerz hé c'harante, egiz ma tilarz an dour-red euz eun eïenen ré leun.

Eur vech-all, Jezuz en em reaz d'ei da welet e-kreiz poaniou skrijus é bassion war ar C'halvar. Neuze Barbon, teneréet muioc'h c'hoas hé c'halon, a ouele dru war holl dourmanchou hé mestr trugarezus. O na daëlou a joa pe a dristidigez a skuilhe ar zantez, pa vize bet Jezuz o terc'hel

kompagnunez d'ei evelse ! Goude-ze ive, he zourel oa deut da vout evithi ken santel hag eun iliz.

Daëlou merc'h Dioscor a rede dreist-holl epad ma ree peden pe orezon. O vont hag o tont, he daëlou a zigoueê d'hê kouêhel meur-a-vech en dour euz ar zal-korronchou, hag an dour-se a gemere eur vertu dreist-ordinal. Laret a reer penos kalz a glanvourien, diskennet er c'hommou-marbr d'en em c'huelc'hi, a zeuaz er-méz diouthê parêet euz o c'hlenvejou. Doue a ree d'anaout dre ar burzudou-se pegen talvoudus e oa d'han karante vraz é zervijerez ha pegen zantel e oa hec'h ene dirag é zaoulagad.

Barbon a enore meurbed ive kroaz hor Zalver. D'an daoulin ec'h é alies dirag eur groaz he doa groet garenni war vein ar vagor euz he zourel, evit trugarekât Jezuz da vout gouzanvet abalamour da bec'hejou an dud, hag ouspen evit dizonjal ouz skeudennou an doueed faos dalc'het endro d'ei, dre urz he zad, e meur a lec'h dre ar verjez pe memes en hé demeurens. Na pet kuech e tistroaz gant faê diouz ar skeudennou divalo-se hag e lare hec'h holl disprizans evithê dre an hevelep komzou : « O doueou ar gevier, c'hui n'oc'h ken nemed portrejou Satan, limachou an Droug-Spered. Ra vec'h eta diskaret d'an douar ha bruzunet didan an treid ! Ra vo kentpell diskaret ho lezen milliget en holl galonou ; rak, elec'h enor hag ejans, na zo dleet d'oc'h 'meit disprizans ar bed-men ! »

Erfin, en he c'harante 'kenver Doue, n'hellaz mui anduri dirag he sellou ar limachou euzus-se,

hag, eun deiz, hi o zorraz, o lakaz e tammou hag a gemennaz d'hê matez o skuba evel traou lor ebarz ar porz. Ken braz oê he levenez goude an tôl kourachus-se, ma krede en em gaout dijaik e-tal dor ar baradoz. Doue a ra zantout douster é garante d'an neb ne zouj nitra evit plijout d'han, hag hen an noa goullet rei ar c'hras vad-se d'é zervijerez ken fidel.

Brassoc'h madelez an noa evit-hi c'hoas neubeudik goude. Erruout a reaz dirag-hi, guisket ganthan drem dudius eun den iaouank, eur bravan e heller da c'hoantât guelet. En é zorn oa eur bizou-aour hag eur bod-palmez. « Deut oun, eme-han d'ei, é hano ma zad d'ho kemer evit ma fried ; ar walen-ma vo ar merk-goarant euz hon alianz. Dre ma vec'h va fried fidel, red e vo d'oc'h gouzanvi tourmanchou kri ha memes ar maro evidoun. Zaê wen ho padiziant a vo ruiet en ho koad, hag ar bod-palmez-ma zo ive ar merk eus ar gloriusted hep par a roin d'oc'h er baradoz. »

Krenvêet en he feiz, harpet war c'hras he fried divin, Barbon na zoujaz mui nitra, goude ar weledigez konfortus-se ; evit chom unanet gant Jezuz, prest e oa d'anduri ar poaniou hag ar maro spontusan : En digoll euz he buhé sakrifiet, hi he devoa an diou gurunen a Werc'hez hag a Verzerez !

III

Eun devez, ha ne oa ket zonz diouthan, setu Dioscor o tigoueout er gêr, hag hen, préz

varnhan, da vont da gaout é verc'h. Souezet o welet tri prenest e lec'h daou war zâl ar c'horronchou, hen a venn gout an abek da gement-se. Barbon, eur min-c'hoarz war he muzellou, ne guzaz ket diouthan perag e oê bet groet ar labour. Warlerc'h hi a ziskouéaz d'han ar groaz garennet war vager an tourel hag a gemeraz tu ac'hano da brêg euz misteriou ar lezen gristen, eus madelez an Autrou Doue, euz bonetir peurbadus ar bed-all. Komz a re ken brao, gant kement a neuz-vad, gant kement a sklerder ma ne gave ket he zad e oa distank awalc'h é ziouskoarn da chelaou deuz hé divizou.

— « Na possubl e vê troet ma merc'h en tu gant ar gristenien, eme-han en é bart é-unan ! — Nan, eur pennad, eur fantazi plac'h iaouank eo an dra-man : Me ia da gomz d'am zro, ha n'hor bo ket poan evit en em glevet » — Essât a reaz, evit guir, war an heur, enebi goustadik diouz lavariou e verc'h ; komz a reaz rustoc'h, komz a reaz gant koler zoken. Poan kollet ; rak Barbon a gave respont war bep tra. N'oa nitra goest d'ober d'ei bralla en he c'hreden. Red é oa da Zioscor anavout ar pezh an dije karet nac'h da virviken, red e oa d'han anaout penos é verc'h a oa kristen.

An egar a ieaz kentiz en é galon, ha trelatet é spered dre ar gounar, hen a vennaz venji é zouéou paian dre eur sakrifiz a zeblant dreist da c'halloud eun tad. O vea gouiet he doa Barbon braëet ar limachou a adore hag o zollet er-méz euz an ti gant disprijans, hen a zaillaz

etrezek-hi, é glezé diw enet, evit rei d'ei tôl ar maro, henvel en é arraj eus eur blei prest da daga eun danvadik. Redek a reaz Barbon dirag-han, terc'hel a reaz en é rog evit espern d'han méz eun torfed ken euzus. Dioscor en em doll war hé lerc'h, bepret é glenzé noaz en é zorn. Allaz ! ema en dare d'hi skœi ha d'hi laza, rak eur vager a, vir diouthi da vont pelloc'h. O burzud, ar vein en em zisparti, ar vager en em zigor hag a lez eun tremen gant ar verc'h paour kasi dianal. Goude-sé ar vein en em unan endro hag a zalc'h en é zav ar paian fuloret hag holl-sabatuet.

Mæs heman n'oa ket distanet d'é goler. Ar vèz da welet é verc'h kristenez, muioc'h pe kement hag an aoun ne vichê lammet diganthan é vadou braz, a vroude goassoc'h-waz an drougiez a oa enhan. Hep dale, hen da glask tro ha ema c'hoas war roudou Barbon. Daou vugul, o tioual ar loened, a ziskuliaz d'han e pelec'h en em guze ar groadurez kez. Mont a ra, en eur red, d'hi c'haout, hi diskar a ra d'an douar, hi bressa ra didan é dreid : pa ne ouar ket ken petra d'ober, hen hi digas d'ar gêr, evel a-stlej hed hé blêo. — Kement-se holl na oa ket awalc'h evit é galon kri : Bemdez, epad eur poulzad amzer, hen a ra d'ei tremen dre bep seurt vilenach, dre bep seurt dismegansou, dre bep seurt poaniou euzus pe euzusoc'h. Erfin skuiz o stourm outhi hep dont a-benn d'hi zrec'hi, hen hi rên é-hun dirag lezvarn ar Goarner Marsian hag a zalc'he e Nikomedi plas an Impalaër a Rom, Maximin. Gant Marsian

e c'houll ma vo barnet é verc'h hervez holl rustoni ar lezénnoù douget enep d'ar gristenien.

Eun den kontant d'ober é garg e oa Marsian. Gourc'hemen an Impalaër, ouspen evit ar c'hoant d'en em ihuellât, a oa traou 'walc'h evit hen lakât tre didrué, mar ne oa ket ben neuze. D'ar pen-kentan koulskoude hen a reaz vann da vout dous ha mad e kenver Barbon. Martreze, dre 'n abeg da vadou braz Dioscor, en noa zonjet dimezi gant é verc'h; martreze ive, o welet anhei ken koant ha ken iaouank, en noa kredet e vije æz hi distroei diouz lezen Jezuz-Krist. O vea roet d'ei kalz a veulodiou war hé furnez ha war hé bravente, hen a laraz d'ei e rankse dilezel ar feiz gristen ha rentout enor da zouéou ar rouantelez.

Mæs promessou ha komzou flour n'o deuz perz ebet war eur galon gloestret d'an Doue gwirion, ispisial p' an dê ar galon-se tanvouéet ar mël hag an dudi euz é garante. Pa wel Marsian e koll é boan dre gomzou kaër, hen a implij ar goudrouzou, mæs hep muioc'h a frouez; ar goudrouzou a zo ken didalve hag ar c'homzou dous evit gounid Barbon. Neuze hen a c'halv ar bourréô gant urz d'hi zourmanti: Heman, p' ema lakeet etre é zaouarn, hi skourje hag hi goal-dret gant korennou ler, trê ken nan eo mui he c'horf nemet goad ha blonsadur. Var-lerc'h e zo gwisket d'ei eur zaë reun evit derc'hel beo pe renevezi loskadur an droug en he gouliou. Krueldet ar Gouarner na zistannaz d'ei, nemed pa welaz ar verzeréz paour fagannet ha dijaik hanter-varo. Neuze hi espernaz, nan dre

drue, mæs en esper da blega hé sentiment ha d'ober d'ei nac'h hé feiz dre eun eil merzerinti.

IV

Ar Gouarner an noa groet tol e prizon ar verc'h iaouank braet ha disroget hé c'horf dre zorn ar bourréô. Eno Jezuz a erruaz d'hi c'honforti. Epad ma oa Barbon egiz dudiet e zonj Doue hag ive ma huanade dre an hirraz da vont d'ar baradoz, Jezuz, evit pehini e c'hoantée skuilha beteg an diwean berrad euz hé goad, hi rentaz pare deuz hé holl gouliou hag a réaz é c'hér da chom en hé c'hichen trê d'ar fin, epad hé merzerenti.

Neuze hi 'n em gavaz krenveet : Ne zoujaz mui nitra aberz falloni hec'h enebourien. Euris memes é oa dre ma roe d'ei ar Zalver an enor da gaout lod euz é boaniou, lod euz é groaz da zougen.

Antronoz, pa welaz Marsian e oa Barbon ken iac'h a gorf evel biskoaz, hen n'hellaz ket miret da zizkoen é eston; mæs vann a reaz da gredi e oa bet paréet ar santez dre c'halloud an douéou paian, hag e laraz d'ei gant eun douser treitour : « True o deuz bet hon douéou deuz hoc'h iaouankiz; anzavit eta pegen braz eo o madelez ha daoulinit evit o enori. »

— « Salokraz, Autrou Gouarner, eme Barbon, ne gredann ket d'ho touéou ha n'o enorin ket. Penaus e vefen diskiant awalc'h 'vit lakât fiars e douéou groet gand koad, mein pe metal ? — Penaus gredfen d'o madelez em c'henver, me

karget-holl a zisprijans evit-hê ? — Nan, nan, ô barner, ne dléan nitra d'hê : ma anouaouedegez, ma grat-vad a zo da Jezuz-Krist, mab da Zoue ha ma mestr da viken. Hennez é an hini 'neuz ma faréet euz ma holl gouliou ha va groet ken iac'h 'vel biskoaz. Prest oun, mar bê red, da c'houzanv ar maro evithan. » —

— « Peguir e fell d'ei, e laraz neuze Marsian d'ar bourrêo, hama ! ra vo graet hervez hé c'hoant. Rogit d'ei hé c'horf gant kribinou houarn, dispennit hé bruched ha rostit hé daougoste gant flammou tan. — Ni welo pegeit e pado da enebi diouzomp e-kreiz an tourmanchou. » —

Ar bourrêo a zentaz doc'h urz ar Gouarner, ha pa welaz heman n'hellê ket an tourmanchou kri-se lemel ar musc'hoarz diwar muzellou ar basiantez, hen a ordrenaz diskarg tôliou war hé fen ha war hé diouskoa. — Poan kollet adarre ! Barbon ne heane o pedi egiz pa n'hé dijé ketzantet ar pez a reer d'ei anduri. Eur c'hras dreist-natur hi c'hennerze, hag evel dudiet dre ar gwel euz an env, hi a lare : « O ma Zalver, splan eo dirazoc'h deon ma c'halon, gwelet a rit eta ema enhoc'h ma holl fians hag ivez ema d'oc'h ma holl c'harante. Ah ! n'am dilezit ket en heur-men. Kendalc'hit, m'ho ped, d'am zouten ; greit na vinn ket trec'het betek ma huanaden diwean. Ha goude, plijet ganoc'h ma digemer en ho rouantelez. Hast am euz d'ho kwelet, da danvât an eurusted peurbaduz a roit d'ho servijerien ! »

Koulskoude ar barner Marsian ne c'houlle ket koll. Klask a ree penaus empenti tour-

manchou krioc'h c'hoas evit ar re 'n oa anduret Barbon. Ar bobl a gemere true deuz ar verzerz hag ec'h é droug enhan ouz ar gouarner hag ouz ar bourrêo. Marsian, o sonjal rei diduel d'ar bobl dre eun tourmant neve deut en é spered, a c'houre'hemennaz diwiska ar verc'h iaouank dirag zellou an holl. Er stad-se, hi a ranksê bout rênet dre ruiou kær, ar bourrêo doc'h hé skourjea evit an eil guech. — Evelse hen a grede a dra zur trec'hi anhei dre ar vèz hag ar velkonî. Mæs peden ar zantez a bignaz prim d'an env gant eur feiz hag eur fians krenvoc'h-krenv e zikour an autrou Doue.

— « O ma mestr ken mad, ô ma roue, eme-hi, c'hui oar, pe garit, kuzet an nâbl adreon ar c'houmoul hag an douar e-kreiz an denvalijen ; mirit, oh ! mirit, mar plich ganoc'h, n'en do ho servijerez paour da ruis gant an dismegans dirag ar baianed-men a zo hoc'h adversourien. Na 'n em zistroit ket diouzon, ô ma Doue karanteuz, ne lammit ket diganin ar grassou a bere am euz breman ken braz ezom ! » —

Kentiz eur voul dân, diskennet euz an nec'h a reaz en-dro d'ei eur wiskamant ken lugernuz ma splannê he c'horf glan dirag ar bobl, 'vel pa vize bet gronnet gant bannou-hêol. Ouspense hi en em gavaz pareet c'hoaz, eun eil guech, euz an holl blessou groet d'ei gant ar bourrêo. Ar baianed, test euz ar burzud-se, a chommaz zebezet-holl hag ar barner é-unan a oe evel skoéet mud. Evithan da vout spontet, ne c'houllaz ket c'hoaz anaout an nerz euz

brec'h Doue. Evit echui tourmanchou Barbon, hen hi c'hondaonaz da vout dibennet.

N'oa ket peurlaret é zetanz pa zavaz eur voëz a vesk ar bobl hag a lare : « Me zo ive kristenez ! » — Eur vaouez paian, hanvet Juliana (ar memez hini eo Afra euz ar myster), touchet dre nêrz-kalon ha dre basianted Santez Barbon, a oa deut d'en em gonvertissa d'ar guir feiz. Marsian a roaz urz d'hi arresti ha d'hi lakât dioustu d'ar maro. O na gras kaër roet da Juliana dre an abeg da veritou ar Zantez ! Rak Juliana a c'hounéaz e berr-amzer hé flas er baradoz, o veza guel'het hec'h ene en eur rei hé bue, en eur skuilha hé goad dre garante evit Jezuz.

V

Dioscor a oa bet test euz an holl vilenach groet d'é verc'h. Pell ma e oa rannet é galon pe teneréet dre an nec'h, hen an noa zantet kentoc'h kreski é arraj eneb d'ei. Dont a réaz, o den dinatur, da c'houlén gant Marsian bout é-hunan é diwean bourréo. — « Me eo hé zad, eme-han ; mæs dre ma dorn-ma hani vo roet d'ei tól ar maro ! » — Ar c'hras euzuz-se na oa ket reüzet d'han gant an tirant. Kemer a reaz eta é verc'h evit hé rên er-mez ouz kêr, beteg eur mene 'lec'h ma vize kastiet an dorfetourien barnet d'ar maro.

Pa oant erruet eno, Barbon en em dollaz d'an daoulin war an dachen, o trugarekât Jezuz hé fried divin d'en devout an enor euz ar verzerinti. — « Ma Zalver, eme-hi c'hoaz, en ho madelez

hep par c'hui a ra zilvidigez ar re a fiz enoc'h ; greit, m'ho ped, ma zantint an douster euz ho trugare — holl ar re 'n em erbedo diouzoc'h gant ar zonj-euz ho Passion hag ive deuz ma maro ; greit m'o do ho sikour gallouduz e pep darvoud, ha dreist-holl ma c'hellint war o zremen reseo ar gommunion hag an nouen zantel gant guir glac'har d'o fec'hejou, evit bout diouallet trê d'ar fin doc'h ardou an Droug-Spered. Beman, ô ma Doue, me ro d'oc'h ma goad ha ma buhe, e testi deuz ma c'harante : Digemerit ma ene etre ho taouarn ha lakit-hi tost d'oc'h, en ho temeurans gloriuz ! » —

N'hé doa ket echuet mad hé fedén, pa oa klevet eur voëz euz an env o respont d'ei : « Deit, o muia-karet ar Zalver, deit da danvât an holl joaüsté a vir Doue d'é vignoned : Holl ar pezh ho peuz goullet ganthan a vo aotrêet d'oc'h evit pep amzer. »

Hé c'halon karget a levenez hag eur musc'hoarz war hé genou, Barbon a zavaz hé daoulagad war-zu hé zad, evel evit pardonni d'han é grueldet ; hi a blegaz hé fenn dirag-han, ha kentiz Dioscor a droc'haz d'ei hé gouk gant eun tól-klenze hepken. Paianed, kristenien, holl ar bobl a loskaz eur griaden herissuz dirag eur seurt torfed. — Slêr oa an amzer : eur poulzadik goude, setu koulskoude ar gurun da strakal e kreiz an nâbl, ha dre eun tól-arneü spontuz meurbed, Dioscor ha Marsian a oé skoët o-daou war-an-dro ha rentet o c'horvou e poultren ha ludu. O relegou, skubet gant an avel, na oant

ket memes kaveñ mui da zastum. Doue n'oa ket dalêet da gastiza en é gounar an daou bec'her aheurtet : kement-se evit skuer d'ar re a oa bet testou deuz o falloni ha deuz o dallentez.

An tarz-gurun-se, ken souêzuz ha ken terrupl, an neuz groet d'ar gristenien a-c'houdevez en em c'hloëstra da zantez Barbon e-kreiz ar barrajou-arnen, hag hi fedi d'o dioual deuz an tan-goal kouls ha deuz ar maro soubit.

VI

N'echuin ket buhe burzuduz santez Barbon hep rei d'anaout penaus eo bet henoret ha pegiz e sikour ar re a glask skoazel ganthi, kement-se a vo evidomp hon-unan eun ali da gaout fiars en hé madelez ha d'hi fedi ebarz an darvoudou deuz hor buhe.

Korf santez Barbon, var-lerc'h hé merzerinti, a oa bet kemeret gant eur c'hristen mad (Valentinian a oa é hano) hag interret en eur lec'h galvet Jélass, peurdost da Nicomedi. E-tal hé bē, meur a glanvour a gavaz pareans d'é boaniou, hag evelse e teuz an dud fidel d'hi enori ha da c'houlén hé froteksion dirag Doue.

Goude eur maréad amzer korf ar werc'hez santel a oa douget da Nicomedi ha miret en eun iliz dirag an oll 'barz eun arched goloet a laonen-nou aour hag arc'hant. Dirag-han e vize noz-dē lamprou pinvidik war ellum.

Diweatoc'h ar c'horf-se oa bet douget d'ar gær a Gonstantinopl ha diouz eno d'ar gær

a Veniz. An enor rentet d'han a greskaz bepret mui-oc'h-mui, ha kent-pell ar verzeréz a zo bet pedet dre an holl gristenien. En hor bro Franz, Santez Barbon a zo bet laket en enor dre ar Groazourien bet e brezelioù ar zav-hêol, p'o doa klasket diskar galloud ar musulmanet war vro ar Palestin hag ar gær a Jerusalem. Meur a gær, ispisial Metz-er-Lorraine a zo didan hé goard. En hor Breiz, kalz a barrezioù o deuz santez Barbon evit patronez pe o deuz chapelioù konsakret d'ei : E-touez ar re-man e hellan niveri Roskof, Guerleskin, Karnak, ar Faouët ; mæs n'oufen laret ped iliz o deuz hé skeuden e eskoptioù Guened, Kemper ha Sant-Briek. Petra-bennag n'eo ket santez Barbon eur genvroadez d'imp, ni hi fed, ni hec'h enor, evel ar zent ha zentezed ar muian-karet ganomp. N'è ket hep ræzon ema enoret kement-all, peguir eo ken braz he galloud dirag Doue ha peguir e ro grassou ken kaer ha ken stank d'ar gristenien.

Er bloa 1448 (e lennomp e Buhez ar Zent) eun den euz ar gær a Gorkum, bro an Holland, a oa bet surprenet e-kreiz eun tan-goat. Ken uhel en em zave ar flammou en-dro d'han, ma e kolle pep esper da zalvetéi é vuhe. Prest e oa da vout mouget dre ar c'hrouez hag ar moged, pa zonzaz goulén zikour gant santez Barbon. Raktal ar zantez en em ziskoezaz d'han, hen konfortaz dre hé c'homzou hag a bromettaz d'han en devize c'hoaze eun devez buhe, evit gallout zakramanti arog mervel. E guirione, ar flammou-tan a varvaz en eun töl-kont : ar paourkez den a govéssaz, a

gommuniaz gant brassan devosion. Goudé hen en devoa bet eur maro dous ha santel. Hano an dense oa Herry Koc.

Eun daou-*gent* vloa bennag war-lerc'h ec'h erruaz eur burzud all e parrez ar Faouët e Breiz-Izel. An dijentil Yan Toulbodou, a Locmalo, a oa deut da jiboeissât er stank a zo etre Priziac hag ar Faouët, elec'h ma tremen ar Ster Ellé. Eur barrad-*arneu* a zavaz, hag an dijentil en em dennaz en disc'hlaq e-mesk *rec'hier* Marek-Bran a zo 'uz d'ar ster. Souden eun *tôl-gurun* a ziskaraz hag ha vraillaz mein endro d'ar c'hasséour holl-stravillet. Heman a grede oa deut e ithan an heur diwean euz é vuhe. E-kreiz é spont, hen en em c'hloestraz d'an itron santez Barbon hag a reaz lé da zével eur chapel en hé hénor war ar lec'h memez ma 'n em gave. Kentiz ar *gurun* a bellaaz, hag an dijentil, miret dic'hloaz, a gemeraz an hent d'ar gær. Neubeut amzer goude, hen an noa prenet ar *rec'hier* elec'h ma oa bet dare d'han koll é vuhe. Gober a reaz zével eno ar chapel en doa gratéet zével d'ar Zantez. Ar chapel-se a c'houdevez, da laret eo, aboue ar bloa 1489, a zo kalz darempredet gant pelerined euz ar parrezioù tro-var-dro. Enhi e weler meur a daolen hag a rent testeni da vadelez santez Barbon e kenver eleiz a dud pere o deuz bet fians en hé froteksion, e-kreiz pep seurt danjerioù.

E buhe sant Stanislas Kostka, e welomp c'hoaz eur c'hras dispar roet d'ar zant-se gant santez Barbon. Hen an noa bet goullet ganthi aliez reseo é zakramanchou arog kuitaat ar bed-men. Hen

en em gave, 'pad eur c'hlenved e ti eun heretik er gær a Vien en Autrich. Kaër en noa goulén eur beleg, den na iê d'hen klask. Stanislas a bedaz santez Barbon da gemer truhe diouthan, ha da rei d'han ar c'hras se aberz Doue. Ne oa ket tromplet en e fianz : ar Zantez a zeuaz betek-han, daou el d'hê heul ; unan euz an eled a roaz d'han ar gommunion. Nag a vurzudou ne ra ket Doue dre ar zant hag ar zentezed euz ar baradoz, bet gwechall é zervijerien war an douar !

Dre ar zikour, ken stank epad an holl oajou, hé deuz bet roet santez Barbon d'ar gristenien, ispisial war an heur euz o zremen, hi a dle bout anvêet a dra zur, war lerc'h sant Joseb, patronez ar maro mad. Piou eta, mar en euz zourzi deuz é zilvidigez, na vo ket devot d'an itron santel ? — Mæs n'eo ket awalc'h pedi santez Barbon ha lakat fians en hé madelez. Eun dra zo c'hoaz guell : Poania da heuilh ar skuerioù kaer euz he buhe, reiz a hon ene dre ar vertuioù o doa hi groet ken santel. E-mesk ar skuerioù ha vertuioù-se, choajomp hé furted, hé nerz-kalon, hé c'harante birvidik evit Doue, hé fasanted da c'houzanvi trubuilhou ar bed-men. Meur a Zioscor, meur a Varsian, mevelien an Droug-spered, a ra brezel kri d'hor feiz. Goujomp, evel santez Barbon, derc'hel penn diouz enebourien an autrou Doue, mervel memes kentoc'h evit nac'h pe dilezel hor c'hreden. Kristenien da viken ! Setu ar lavar a dle bout aliez war hon teod. N'euz forz neuze nag e vé red d'imp gouzanvi poan, dismegans pe koll

war an douar : Eun devez, ni a vo digollet
gant ar mestr mad n'hon dilezo ket. Er baradoz,
ec'h ankouaïmp holl glac'hariou an draonien-
men a zaêlou : Eno e tanyañp gant Jezuz
hor Zalver an eurusted hep par hag ar peuc'h
peurbaduz.

Evelse bezet groet!

IMPRIMATUR :

J.-M. KERDAFFREC,

Vic. gén. hon.

Pontivy, 4 Juin 1903.



GUERZ SANTEZ BARBON

E parrez ar Faouët (Guened)

Ton : *Santes Noaluen*

DISKAN

*Enor d'oc'h, Santez Barbon,
O Guerc'hez ha merzerez!
Ni ho kar a wir galon,
Zellit ouzomp gant truez.*

I.

Galv d'ar bardonerien.

1. Salud ! salud d'ho chapel
Ken koant e-mesk ar reier,
Evel eun neiz turzunel
Dreist ar stanken hag ar ster !
2. Azê hi gloestraz guechall,
An Autrou Yan To ulbodou
Ho poa miret didammal
E-kreiz freuz ar gurunou.

3. A c'houde pevar c'hant vloa,
Nag a dud a vandennou
A zo deut d'he bizita
Pa vê deiz ho pardonioù ? —
4. Oh ! na piou laro niver
Ar re ho peuz zikouret,
E-kreiz darvoud pe danjer,
P'o deuz d'oc'h 'n em erbedet ? —
5. Ho tiouvrec'h bepret digor,
Ho kalon leun a drue,
C'hui zigemer tud-Arvor
'Vel eur vam he bugale.
6. Pa c'halv ho kloc'h d'ar menez.
Paour, pinvik, bourc'hiz, mésiad,
Koz, iaouank gant levenez
D'ho kwelet 'weler tostât
7. 'Leiz an henchou e teuont
Euz an dro hag euz a bell,
Dirag-hoc'h e taoulinont
Hag holl e kavont skoazel.
8. Rak ni holl, Santez Barbon,
Ni fiz enoc'h d'hon difen ;
C'hui zo dalc'hmad hon itron
Er joausted pe 'n anken.

II.

Buhe ar Zantez.

1. Ganet e Nikomedi
A gerent euz an nopl,
Madou braz ka koantiri
Ne vankent d'oc'h er bed-ma.
2. Mæs, dre eur sklerder dispar,
C'hui a welaz hep dale
N'eo gloriusted an douar
Nemed spesou didalve.
3. — « Adreon, 'me-hu, faos-douéou !
» Choajet em euz, choaj eüruz,
» Servija Mestr an envou
» Hag heuilha lezen Jezuz. » —
4. Nitra deuz stlabez ar bed,
Enor, plijadur, danve,
Nan oa plas en ho spered
Entanet evit Doue.
5. Ouz koulm Noë oac'h henvel,
Koulmik fur a chommaz guen
O nijal a denn-askel
'Dreist ar fank hag ar vouillen.
6. Ken pur oa, ken dudiuz
Ar gened euz hoc'h ene,
Ma falvezaz da Jezuz
En em ziskoez d'oc'h, eun de.

7. — « Beet d'in, em-han, d'in hepken,
» Setu lili ar guerc'hted
» Hag a rey ho kurunen
» E-mesk ar Zent, an Eled ! » —
8. Eur vech-all, e welsot c'hoaz
Ho Salver ru gant ar goad,
'Vel pa varvaz war ar groaz,
Truezuz d'ho taoulagad.
9. En hoc'h ene o tassion,
Eur voéz a lar adañfe :
« Ma fried oc'h, ô Barbon,
» Va merzerez vec'h ive ! »
10. Neuze 'vidoc'h bout dalc'het
En eun tour 'dreon moraillou,
An amzer d'oc'h ne bad ket
O hirvoudi d'an envou.
11. Guinel, kent treuzi ar mor,
A grenva he diouaskel,
Ha ne zouj mui o digor
E-kreiz arneu nag avel.
12. 'Velse dre an orezon
Ha dre binijen kaled
'Poa kemeret nerz-kalon
'Vit ar stourmou da zonet.
13. Goudé eur veach poaniuz,
Pa wel ho Tad Dioscor
Ez oc'h diskiplez Jezuz
N'hell mui derc'hel é fulor.

14. — « Red eo, eme ar paian,
» Diansav ar feiz gristen,
» Ha distrei kentan-huan
» D'an douéou ha d'o lezen ! » —
15. Ouspen-se, hep enebi,
Vo red kemer eur pried
An neuz en é fantazi
Evit é verc'h dibabet !
16. Mæs c'hui a lar, ô Barbon :
« Salokraz, ma zadik ker,
» Den na blijo d'am c'halon
» Nemed Jezuz ma Zalver ! »
17. « Hen zo ma mestr, ma Roue,
» Nac'het am euz ho touéou ;
» D'han eo gloestret ma ene,
» Tavit komz a briejou ! »
18. Hen a ra ho skourjeza
Ha dispen ho korf dinam ;
Dre eur burzud ar c'haëra
Oc'h rentet pare-divlam.
19. Mæs, ô dallentez hep par
Euz an den 'vê aheurtet,
Ho tad e kresk é gounar
Elec'h na vê distanet.
20. En é harraj hen ho ren
Da gaout Marsian ar barner,
Hag ho maro a c'houlén
Mar ne blegit d'hân ember.

21. Dirag fas ar Gouarner
C'hui en em zalc'h hep doujans :
Gourdrouzou, promessou kaër
Ne c'hellont rei d'oc'h troublans.
22. -- « Kristenez oun hag e vin,
Eme-hu, dre c'hras Doue,
« Laouen va goad a skuilhin
» E goarant d'am c'harante ! » —
23. Zetanset oc'h d'ar maro
Dre urz didrue Marsian :
Ar bourrêo (piou a gredo ?...) —
A vo ho tad é-unan.
24. Ken dous evel eun danvad
'C'houzanvit an töl klenzè :
An douar a ev ho koad,
Ha d'an env zav hoc'h ine.
25. Mæs dre ar gurun dioustu
— Eun töl spouronnuz meurberd —
Ho muntre goez e ludu,
E kastiz euz é dorfet.

III.

Peden d'ar Zantez.

1. Eveldoc'h, ô merzerez,
Ni fell d'imp karout Doue ;
Ra beffemp ho santelez
E oberou hor bué !

2. Hor feiz, war skuer hoc'h hani,
Ra vo nerzuz d'hor zouten ;
Na vezimp Bretoned mui
Mar n'oump stard en hor c'hreden.
3. Egiz eun douar zantel
Breiz-izel a zo brudet :
Ra zalc'himp d'ar vrud-se pell
E priz hor goad, mar bê red !
4. — « Guell maro 'vit saotradur ! » —
Larè hon tadou guechall :
Reit d'imp nerz da veva pur
Ma 'larimp-ni kement-all.
5. Warlerc'h madou an ene,
— Ar guir vadou da c'hoantât —
Ré ar c'horf ganoc'h ive
A c'houllomp, patronez vad.
6. Pa bar luc'hed hérissuz,
E kreiz strakl ar gurunou,
Ra vo ho torn akétuz
D'hon miret a wal-heñriou !
7. Pa vè tarzou pe tan-goal
Digasset d'hon kastiza,
Hastit buan d'hon dioual
Ma héanimp o krena !

8. Eun dē 'vo pred ar maro,
Deiz ar spont hag an anken,
'Vit na vo ket ré c'huëro
Bezit neuze 'n hor c'hichen.
9. Goulennit d'imp gant Jezuz,
Da gonforti hor c'halon,
M'hor bo é gorf présiuz,
Arok mont dirag é dron.
10. Warlerc'h, advokadez vad,
'Tre ho tiouvrec'h benniget
Zerrit dous hon daoulagad
Ma 'z-imp d'an env d'ho kwelet !

IMPRIMATUR :

JÉGOUZO, vik. gén.

Nota. — Ar werz-men a zo bet primet ar gentan é
kenstrivadek (*concours*) ar guerziou, er bloa 1903, é
kær Lesneven.



EIL LODEN

Merzerinti Enoruz
Santez Barbon

Myster e pemp arvest.

Le glorieux Martyre de Sainte Barbe

par l'abbé MORET, curé de Saint-Menoux.

Drame mis en vers bretons, avec quelques change-
ments dans le texte,

par l'abbé LE MAY, recteur de Saint-Aignan.

HANVOU

Ar re o doa c'hoariet ar myster-man e
parrez Ar-Zent, d'ar 14 a viz Ebreul 1903.

<i>Dioscor</i>	L.-M. AR ROUX.
<i>Barbon</i>	L.-M. BOULBEN.
<i>Afra</i>	F. AR GOFF.
<i>Marsian</i>	J. BODET.
<i>Tijel</i>	C. CHARPENTIER.
<i>Médon</i>	L. AR BRIS.
<i>Ar bourréo</i>	R. MAHÉ.
<i>Ar pôlr iaouank</i>	L. MORU.
<i>Ar c'hristen</i>	J.-P. MAHÉ.
<i>Porzer ar prizon</i>	J.-M. PICARDA.
<i>Soudardet</i>	{ N. CADOUX, Y. COSPÉ- REC, J. CHARPENTIER
<i>Prizonerien</i>	
<i>Embanner ar myster</i> ...	J.-M. AR POULICHET.
<i>Kánerez</i>	An demezell Marie AR ROUX.



Kentan Arvest

Diviz Kentan

Barbon hé-unan en eun tourel. War ar gampr e weler fals-douéou diskaret ha braëet.

BARBON

Dalc'het oun 'n eun tourel evel eun ermitez
Da veva ma-hunan pell euz kompagnunez :
Diouz an dud, er lec'h-men, n'am euz ket darempred
Egiz n'am befe mui kerent na mignoned.
Daou brenestr d'ar sklerder a gallen digori,
En enor d'an Drindet am euz groet ober tri.
An amzer ne bad ket, rak me gass noz-ha-de
Da Zoue, ma C'hrouer, hirvoud ma c'harante.
Pa c'hourdrouz an arnéu, pa iud an avel foll,
Ken e vé peb-unan dre ar spont sklasset-holl,
Mouez Doue a lar d'in dioual euz pep pec'hed,
Rak é vrec'h gant kounar dreist d'hor pen zo paret.
Pa welan bokedi, a-hed an new-amzer,
Ken koant, 'mesk ar ieot-glaz, dre an holl brajeier ;
Pa welan an edou a bleg, a zav o fenn
Didan ar bannou héol, 'vel goagennou melen,
Kredi rann hen guelet — Doue leun a drue,
'Vel eun tad dous ha mad — c'hoarzin d'é vugale.
Na kaër an nábl henoaz ! Ra zavo ma zellou
Etrezek ar stered a lugern en envou !
P'o guelan ken sioul, ken lemm ha ken skeduz,
A bep poan, bep trubuilh e teuan ankouéuz ;
N'euz ken zonj em spered nemed goulén grat-vad

Merzerinti Santez Barbon

Pez-c'hoari e pemp arvest.

PERSONNACHOU :

DIOSCOR, dijentil á Nikomedi.

BARBON, merc'h Dioscor.

AFRA, matez-kampr Barbon ha bet guechal
hé magerez.

MARSIAN, gouarner Nikomedi, é hano an
Impalaër Maximin.

TIJEL, servijer Marsian.

MÉDON, servijer Dioscor.

Ar bourréo, — Soudardet, — Prizon-
nerien.

Eur c'hristen, — Porzer ar prizon.

Eur pôtr iacuank a bemzek vloa.

Eur c'hœur a ganerien.

An hini warnomp-holl an euz é zaoulagad,
Hag a skuilh é vennoz war baour, war binvidik,
War an derven uhel ha war ar gorzennik.
Trugare laran d'han da vout ma c'hennerzet,
Da vout renet ma dorn d'ober pezh am euz groet.
Setu braëet ganin limachou an douéed
A zigassé zonz d'in pegeit amzer oun bet,
'Vel eur ieô war ma fenn, didan galloud Satan.
Piou gredo kement-all eo ma brec'hig ken goan
An euz o diskaret a-ziwar o fostou,
An eus o bruzunnet ha laket é tammou ? —
N'hallen mui gouzanvi o fourtrejou meuz,
Aboue m'oun kelennet war lezen gaër Jezuz.
Bremen e veint skubet er porz egiz traou lor,
N'o do mui en ti-men nag ejanz nag enor.
Nan ! Jezuz, ma Zalver ha guir vestr ma c'halon,
En o flas evit mad a gemero an trôn ;
An tourel-men a vo é zemeurans santel,
Hag enni e vimp holl é sujidi fidel.
Med eun dra, ma Doue, ganoc'h a c'houlennan,
Hep ehan d'hen rei d'in gant daelou ho pedan :
Ma zad a zo paian ; n'anav ket ho lezen ;
Ah ! greit m'en em denno deuz an denvalijen !
Reit d'ezan ar guir feiz am euz resevet-me
Hag a renkan, siouaz ! derc'hel kuz em ene.
Ho pet true diouzon, true demeurez ma zad,
Ha warlerc'h, mar kerit, goullit ganin ma goad :
Mervel a rin joaiuz mar e c'hellan gueleit
An tad-se a garan emesk ho tiskipled.

(Klevet a ra trouz a-dreôn an nor).

Mes na piou vé erru ?... Adrazur eo Afra
O tonet da c'houlenn mar ne vank d'in nitra !

II Diviz.

BARBON hag AFRA

AFRA.

Noz-vad d'oc'h, ma mestrez, deut oun me da welet
Mar fell eun dra-bennag arok mont da gousket.

BARBON

N'oa ket ezom, Afra : koulskoude deut oc'h mad,
Kemerit eur skabel ha kojomp, eur poulzad.

AFRA

(O klask eur skabel, hé zreid a stok ouz an
douéou torret, hag hi a lar :)

Ah ! petra welan-me ? Mankout ra ma c'halon ;
Etre ma zreid setu dorn Merkur, penn Pluton,
Allaz ! Allaz d'imp-ni !

BARBON (o vuzc'hoarzin)

Reit peuc'h d'in, Afra gez,
Kassit divar ho tro spont ha tristidigez :
Merkur, an doué-laer, ne noazo d'imp morse,
Ouz é gonsort Pluton na vimp ket oaz ive.
Klask a ren-mê pell-zo rei d'oc'h d'anavout skler
Penaus an douéou-se 'zo douéou ar gevier :
Na veritont nemed ar vrasan disprijanz,
E-lec'h doujanz an dud ha c'houez-vad an ejanz.
Zellit petra 'meuz groet : Torri o limachou
Evel ma vé doc'h ar vein torret ar c'hoz-podou !
N'o deuz galloud ebet !

AFRA

N'eo ket guir, ma mestrez,
Ho pe groet derbodou gant douéed ho palez ?

BARBON

Iao 'vad, me ma-hunan, ha biskoaz eur seurt joa
N'am oa-me c'hoaz tanvoet er bed-men gant nitra
'Vel an hini am euz da vout skarzet ma zi
Euz mistri an ifern hag euz o loustoni.

AFRA

Nag ho tad, ma mestrez, mar tigouez hep-dale,
Petra laro, siouaz ! pa ouio kement-se ?..

BARBON

Doue a zo hor Mestr : Ennan vè ma zouten.
Na vern petra erru, levenez pe anken.
Oh ! ma zad martreze, sklerijennet gantan,
Hen anavo 'rok pell hervez e c'hoantéan.
C'hui, d'é heul, c'hui, Afra, a groadur fidel d'in,
Ma magerez karet, ma eil-vam, pe larin,
Perag dinac'h pelloc'h ar joa-se d'am c'halon ?
Ah ! kredit é Doué, mestr an env, an douar ;
Hen hepken zo parfet, hen hepken zo hep par :
Nerz, galloud, madelez, géned ha karante,
N'euz nemetan vè goest da leunia hon ene !
Ho touéed, zonzit mad, ne dint nemed diaouled ;
Gante iei d'an ifern an dud paour dianket.

(Klevet a rer trouz eur vanden tud o kerzât
hag o tostât d'an tourel),

III Diviz.

BARBON, AFRA DIOSCOR, ha lod euz é servijerien.

DIOSCOR

Ma merc'h a garante !

BARBON

Ma Zad, pebeuz dudi !
Rak eun distro ken pront a zeu d'am estlammi.

AFRA (*goustadik*)

(Kuzet a ra limachou an douéou torret)
Hep dale, aoun am euz, meur estlam a vo c'hoaz !

BARBON

Mil bennoz d'an envou, pa'z oc'h chomet dic'hloaz,
Pa'z oc'h iac'h ha dispos hag ho péach groet mad !
Mall am oa d'ho kuelelet dirag ma daoulagad.

DIOSCOR

Ia, ma merc'h, c'hui lar mad : Trugare d'an douéed
O deuz dre vadelez a zroug ma dioualet !
Pa voan 'treuzi ar mor, ô darvoud herissuz !
E savaz eun tourmant ken kri ha ken spontuz
Ma krediz iè hor lestr en eur red d'en em goll,
Hag e oamp en isfond hep doutans beûet holl ;
Rak ar vartelodet hag ivez ar stûrier
Hen lezê toll-distoll emesk zâbl ha reier :
Red vo 'ta, laren-me, pebeuz poan d'am c'halon !
Red vo mervel hep mui guelet ma merc'h Barbon.
Hag ar zonz-se, siouaz ! é kreiz ma holl anken

A dreuzê ma iné 'vel eun töl-klenzé ien.
Mæs an douéed erfin, touchet dre hor c'hlemmou,
A zalc'haz an avel kenkouls hag ar goagou :
Plean e teuaz ar mor, sioul-braz an amzer,
Hag eur wech c'hoas setu emoun digouet er gær.
Bremen, ma c'hroadur kez, biken n'ho kuittain,
Diouzoç'h em bo konfort trê keit ha ma veyin.

BARBON

O ma zad, me ivez, me lako ma holl boen
Da rei d'oc'h karante ha d'ho terc'hel laouen.

DIOSCOR

C'hui a rey kement-all d'an hini zo choajet
Ganin-me, ma merc'hig, da veza ho pried.
Lusius hen hanver, vaillant an kabiten
Euz ar ré o deuz brud en armeiou rômen :
Penher eo hag ouspen euz a lignez uhel,
E neb lec'h ne gaffet eur parti a vê guell.

BARBON

Ré zivead eo, ma zad, kinnig d'in eur pried.

DIOSCOR

Perak 'ta ?

BARBON

Gant eun all ma zonj am euz laket.

DIOSCOR

Petra ! pa oun-me pell peffê groet eur choaj-all ?

BARBON

O ma zad, evit-se, m'ho ped, bezit dijal :

Ar pried euz ma choaj, pa larin guir diouthan,

Euz an holl brêjou a zo pell ar guellan.
E vadou, é c'halloud, é c'héned zo hep par,
Karantéuz 'vel-t-han n'euz ket war an douar,
Ken dign da gaout ma dorn é nep tu ne glaskit.

DIOSCOR

Hanyeit d'in an den-se 'ma ken braz é verit.

BARBON

N'ema ket er bed-men : E hano.....

IV Diviz

Ar memez personnachou, ha Médon oc'h erru-
out, é fas drouklivet ha leun a droublans.

MEDON

... ? Tra spontuz !

DIOSCOR

Petra zo ?....

MEDON

O na reuz ! ô na darvoud euzuz !

DIOSCOR

Komz eta, genaouek, lar founuz petra zo !

MEDON

Ah ! ma mestr, aoun am euz nama zeod a sklasseo.

AFRA (*goustadik*)

Aiaou d'am c'halon baour ! diskuliet eo an töl.



MEDON

Komz a rin, war hoc'h urz, nan avad hep horrol :
D'an douéou a garomp e zo groet en ho ti
Ar-vrassan dismegans, ar goassan viloni.
Guelet am euz, Autrou, darn euz o skeudennou
Skubet ebarz ar porz ha laket é tammoù.

DIOSCOR

Skeudennou hon douéed er porz a zo tollet !
Na piou a vé kabluze euz hevelep torfet ?
Klaskit d'in ar monstr-se, kerc'hit-han dirazon
Ma plantin d'han doustu ma c'hlenv en é galon.

AFRA

Ouz neb a zo kabluze, ma mestr, bet trugarez !

DIOSCOR

Trugarez, emé-c'hui ? hep mervel gant ar vez
E kredit ba ma fas difenn ar fallakr-se ?

AFRA

Ia, pardon evit-hi ; m'ho ped, bezit true !

DIOSCOR

(O tenna é glenzé.)

C'hui eta zo kabluze ?

AFRA

Ah ! Autrou, ma skoét :
Kounar ha kassoni warnon-mé diskargit.

BARBON

Ma zad, dalc'hit o torn, rak Afra zo divlam ;
Euz ar peze a zo groet mé gemer holl ar zam.

DIOSCOR

C'hui, ma merc'h, na gwir eo, 'peffé groet kement-all
Hep na vé morz ho prec'h, hep na vec'h skoét dal ?
Ah ! redit, ma daélou ; gouélit, ma daoulagad ;
Gueñ vé d'in bout maro 'vit kaout seurt kalonad.
Red eo 'ta, ô ma merc'h, e vec'h diskiantet,
Pe martreze zoken e véfec'h gounezet
Gant an dromplerien-se a hanver kristenien ?
Tan ha kurun warnon d'am lakât e poultren !
Ia ! kristen eo ma merc'h : Re bell am euz bevet
Peguir oa dléet d'in eun dra sort-se guelet.
Kristenez eo ma merc'h, ma joa, ma c'harante !
O douéou gallouduz, kement-se a zo re !

BARBON

Plijet ganoc'h, ma zad, chelaou deuz ma c'homzou,
C'hui welo n'euz nitra da rei d'oc'h pennadoù :
Egiz m'ho henoren, bepret ho henoran ;
A galon ho karen, a galon ho karan.
Ia, dreist d'in ma-hunan m'ho kar e guirione,
Prest oun e testi da ginnig ma buhe :
Mæs na stard e kavan e véfec'h e fazi,
Ha n'hellfec'h evel don euz ar gaou bout dilui !
Na kri eo d'in guelet ho peuz feiz ha doujans
Evit douéou didalve dign a bep disprijans !
O ma zad !

(Hi 'n em doll d'an daoulin dirazan)

Me ho ped, dre ar garante vraz,
Ar garante tener a ran d'oc'h a viskoaz,
Lezit an dromplerez hag an denvalijen,
Trois kein d'an douéou, trois kein d'o c'hreden.

N'euz nemed eun Doue, mestr war gement tra zo ;
 Jézuz, é vab karet, evidomp zo maro !
 D'han ez eo pep galloud, pep mad, pep eurusted ;
 D'han hepken e tléomp feiz, fianz ha resped,
 Hennez a bedan-me war ma daoulin bemde,
 Hennez eo hag a vo gwir bried ma ene.
 Kristenez oun : ma zad, bezit kristen ganin.
 Ia, greit evit ho mad ar blijadur-se d'in,
 Ma vo hon diou galon chadennet er bed-ma
 Dre ar garante c'hlan a rey en env hor joa.

DIOSCOR (*sklassuz*)

Peuc'h d'in, tra divergont : ma c'halon 'peuz treuzet ;
 Trei ar gountel enhi avad n'andurin ket.
 Me oar : Ar gristenien o deuz divizou kaër,
 N'eo ket burzud e vec'h lasset en o gevier.
 Petra 'peuz-hu klevet euz o muzellou flour
 Nemed meulodiou ha kant zorc'hen treitour ?..
 Mæs ha komzet o deuz euz ar reuz, ar glac'har
 Ho tizo hep-dale, ho plego d'an douar ?..
 Euz ho hano zaotret, euz ho madou kollet,
 Euz ho lignez divlam breman dizenoret ?..
 Oh ! nan, na kennebeut n'o deuz ket touchet ger
 Euz ar prizoun tenval e-lec'h ma vec'h ember,
 Euz ar véz a rey d'och stoui ho penn ato,
 Euz an tourmanchou tenn ho kasso d'ar maro,
 Euz ho tad digonfort, c'hoaz e kreiz é vuhe,
 Gant an nec'h d'é verc'h paour o tisken 'barz ar bê.

BARBON

Gouzout a ran, ma zad, petra zo va gortoz ;
 Ma spered koulskoude ne goll ket é repos,

Rak n'euz poan, na tourmant na c'houzanvin joaiuz
 Kent dianzaf ma feiz, kent dilezel Jezuz.
 Holl vadou an douar zo moged hag avel,
 Neb o c'har, kaër en do, n'o miro ket goal-bell.
 Ar madou ro Doué d'é wir zervijerien
 Zo hepken talvouduz, int a bad da viken :
 Gant-hé 'ma va fianz hag holl c'hoant ma c'halon,
 Ha mervel vo eur vad nan eun droug evidon.
 'Meit eun dra, pa varvin, ne rai d'in melkoni,
 Eun dra mantruz dreist-holl, gober va disparti
 Euz an tad a garan muioc'h 'vit ma buhe,
 Hag a lakan dreist-holl nemed dreist ma Doue.

DIOSCOR

Beza kristen, eta, hennez eo ho ménnoz ?

BARBON

Ia, nitra ne rey d'in distrei deuz ma frepoz.

DIOSCOR

An dismegans, ar véz, ar goab war ma bléou guen,
 Setu, merc'h dinatur, petra fell d'oc'h a-gren ?

BARBON

Eun enor eo, ma zad, eun enor dreist-moder
 Gouzanv évit Jezuz zo 'n em c'hroet hor Zalver.

DIOSCOR

Dirag ma dizesper, c'hui ro 'ta hoc'h assant
 D'am c'hass tré d'ar maro hep disteran damant ?

BARBON

O ma zad, mar vé red, gant pebeuz levez.

E skuilhfen holl ma goad, e rofen ma buez
Evit diskoez d'an holl pegement ho karan !
Hepken Doue, hor mestr, en ho 'rok a lakan.

DIOSCOR

Allaz ! nitra ne rey : dallet eo, dallet trë,
Petra c'hortozan c'hoaz, anuot ma 'z oun-me ?

(Gant fulor :)

O douéou, m'hen tou d'oc'h : Bremaik vec'h venjet,
War an heur en hé goad ar c'hlenv-ma vo ruiet.

(Zevl ra é glenze).

AFRA

(Hi en em lak etre Dioscor ha Barbon).

True, ma mestr, true demeurez hé iaouankiz !

AR SERVIJERIEN

True, true diout-hi !

DIOSCOR

Nan, ra vervo kentiz !

(zevel ra é glenv)

BARBON

Doue a vadelez, oh ! eun tól ken divad,
Eun torfed ken euzuz, espernit-han d'am zad !

(Barbon a dec'h kuit dirag Dioscor ; heman a zo
dalc'het dre zaouarn é zervijerien.)



Eil Arvest

I Diviz.

(Marsian, gouarner Nikomedi, a zo e-unan o tifraëa
an afferiou euz ar vro. Dispak a ra eun tam-skrid
punet endro d'eur wialen.

MARSIAN

Setu névention : Tollomp founuz eur zell
War ar parich deut d'in dre ma mevel Tijel.
— « E ti braz Cornely, ar gristenien bemde,
» En em zastum e-kuz wardro ar goulou-dë.
» Eun den koz, enorabl, a brezeg d'ar vanden,
» E kreiz eur sakrrifiz a c'halvont offeren :
» Hennez eo an Eskop, o fastor, emint-hi ;
» Holl, e hano Doue, emant é sujidi.
» Vel guellan mignoned e klaskont an dud paour,
» Hag e rannont 'tre-z-hé dillad, arc'hant hag aour,
» 'Vit o gounid, kredabl, d'al lezen milliget
» En em strevo kent pell dre bevar c'horn ar bed. » —
Tijel

.....
Mad ! ar pezh a glasken. Evit c'hoaz an dud-se,
N'anavont ket Marsian, o gouarner néve ;
Mæs arok pell-hen gaint. Pep-unan a ouio
Piou e Nikomedi d'an holl a gommando,
Piou a viro na vo ganthê hon douéou-ni
Diskaret d'an douar ha ruillet 'barz ar pri, —
Piou a harzo diouz den da zevel en o flas
Eun Doue disprijabl zo marvet war eur groaz.
Ma labour groet, perag digant an Impalaër
N 'am beffê-me fiars da vout aontachet kaër ?

Maximin a ra stad euz é zervijerien,
Dreist-holl mar c'hoalgassont pobl vil ar gristenien.*

II Diviz.

MARSIAN ha TIJEL.

TIJEL

Mestr enoruz meurbed, ho peffê 'r vadelez
Da zigemer eun den a zo deut d'ho palez ?
Eun dra ponner, mezaoun, a wask d'han é spered.

MARSIAN

Piou a vè an den-se ?

TIJEL

Unan euz pinarded
A gær Nikomedi, é hano Dioscor.

MARSIAN

Larit d'han dont ama : kert da zigor an nor.

(E-unan :)

Hum : heman a dal boen e vè groet stad outhan :
Eur poulzadik a zø, dorn é verc'h a c'houllan.
Plac'h koant evel Barbon e nep tu na welet.
Gant he daoulagad c'hilaz hag he bléo alaouret ;
He c'hoantiri zo braz, brassoc'h eo hé furnez,
E-mesk ar merc'hed-all hi leuc'h 'vel eur brinsez.
Na doussan planeden zo e bro ar stered
'Uz da benn ar galant hi devo da bried !
Da gomz d'in euz é verc'h martreze 'teu an tad,
Kuzomp hor zantimant ha greomp fæson vad.

III Diviz.

MARSIAN, DIOSCOR, ha Tijel e deon an theatr.

MARSIAN

Didosteit, Dioscor, deit trè ; rak eun dudi,
Pa ho kuellan djstro, eo d'in ho saludi :
Ho péach zo bet hir, na mad eo bet ive ?

DIOSCOR

Mad ! ia, re vad, Autrou. Salokras, me garfe
N'am bê gallet kiskoaz kaout an hent euz ar gær,
Me gar vè bet ma bag braëet doc'h ar reier.

MARSIAN

Perag 'ta ? Na petra fellfê d'oc'hu laret ?

DIOSCOR

Aboué ma'z oun distro gant an nec'h oun lahet

MARSIAN

Ho merc'h, ar verc'h chentil 'ra enor d'ho hano,
Ha klaon e vefê-hi pe stoket d'ar maro ?

DIOSCOR

Na klaon, na maro, nan ! Siouaz, n'ema tam gwell.

MARSIAN

Petra 'ta choarv ganthi ?

DIOSCOR

Ah ! red vo d'ei mervel,
Rak kemeret hi deuz, o na milligaden !
Ia, kemeret hi deuz kreden ar gristenien.

MARSIAN

Ho merc'h-hu, Dïoscor, ho merc'h zo kristenez ?

DIOSCOR

Allaz ! re wir eo-se : Goassoc'h zo, mui jamez,
Na c'houlénno distrei d'hon douéou gallouduz.
Diouzoc'h-hu, Gouarner, martreze vo zentuz :
C'hui a zalc'h en ho torn goalen ar c'hoarnamant
Hag an nerz da drec'hi pep seurt aheurtamant.
Reit zikour d'in, m'ho ped, ha kousto pe gousto
Greit da va merc'h trei kein d'ar gristenien ato ;
Implijit war hé zro promessou, gourdrouzou,
Ha memez, mar bê red, ar c'hria tourmanchou.

MARSIAN

Oh ! ne dimp ket ken pell : Fianz, ma mignon ker,
Trec'h oun bet, kredit mad, alies e berr-amzer
Da veur a spered berf, da veur a benn kaled :
Mæs ho merc'h, evit zur, euz an dud-se n'eo ket.
Re vad ec'h anavan he douter, he furnez
Ma zonjfen na chommo pell hon adversourez.
En hé oad e chanjer euz an dë d'egile :
Galvomp-t-hi, mar kerit, d'ar lezvarn hep dale.

DIOSCOR

Ia, galvomp-t-hi doustu, mar plij ganoc'h, autrou.

MARSIAN

Just awalc'h, bout a zo assignet vit hiriou
Meur affer hag ec'h an da zilua souden ;
Kalz anhë a zeu d'in aberz ar gristenien,
Ar re ze n'ouzont ket petra eo ma c'hounnar,
Na peseurt c'hoant am euz d'o moustra, d'o diskar.

(D'é zervijer Tijel :)

Hervez koustum ha reiz, galv ar skrivagnerien ;
D'ar mestr-bourréo ive ro buan gourc'hemen
Da zerc'hel prest ha tost binvijou é vicher ;
A c'hoardou ma falez gra kreski an niver ;
Lak evez, en eur ger, ma vo war-eün pep tra,
Rak lufr a fell d'in rei d'ar varnedigez-ma.

(Da Zioscôr :)

C'hui. Autrou dreon an nor, chommit tost da glevet
Ar pezh a c'hoarvezo : m'ho kalvo, pa vo pred.

V Diviz

Ar memez personnachou. Ar bourréo, ar skri-
vagnerien, soudardet, Barbon gant eun ær zeven
ha modest.

MARSIAN (*da Varbon :*)

Eun dra goal-souézuz a zo bet laret d'in ;
Mæs an dra-ze penaus birviken hen kredin ? —
Mar vefê guir ar vrud, c'hui, merc'h da Zioscor,
C'hui, penherez pinvik, dign euz a bep enor,
C'hui ho peffë davad en em c'hroet kristenez !
Unan euz an dud-se brudet a bep kostez
Egiz tud ar fallan, tud difeiz ha diroll,
Tud, evit kant rezon, tamallet gant an holl.
Mæs eur spered ken lemm 'vel ma'z eo ho hini,
Daoust hag a vë faziët e ken braz sotoni ?
Eur galon, 'vel m'ho peuz, nobl ha karanteuz
Daoust hag e vë zaotret dre eur zi ken euzuz ?...
Nan ; n'hellan ket kredi vë guir ar lavar-se
Rak ho tad hep muioc'h gant an nec'h a varfe.

Ho kalvet am euz 'ta dirag an tribunal
Evit kass da nitra pep gaou ha pep tamall,
Evit rei dirag holl an desteni anat
E toujit hon douéou hag o c'harit dalc'h-mad.

BARBON

O barner, n'eo ket gaou ar pezh ho peuz klevet :
Me zo deuz an dud-se vê kement disprijet.
Ia, kristenez oun-me, hep aoun hen anzavan,
Rak hennez eo 'vidoun ma hano ar c'haëran.
Doue ar gristenien a zo eun Doue mad,
Evel ho touéou faos n'ema ket eur gaouiad :
Dre é gomz en neuz groet an douar, an envou,
D'hàn hepken e tléomp meulodi, pedennou.

MARSIAN

Tavit timad, tavit gant ho preg offansuz,
Bezit aoun euz fulor an douéou kasonuz ;
E kær Nikomedi, goarant oun, n'ouzc'h ket,
Pe dre gaër pe dre haëg ma vefent enoret ?

BARBON

Ha me, na vern ket sé, m'o disprij dre c'hellan ;
Rak spesou, nitra ken, setu petra welan
En ho Touéou didailh groet a dôliou boc'hal,
Pe kizellet ér vein, pe teuzet ér metal !

MARSIAN

Krenit, rak bremaik e ouiffet poez o brec'h.

BARBON

Mar n'euz ken d'am sponta, e chomin zur dinec'h :
Pa 'm euz-me bruzunet o c'hoz-skeudennigou,
Pelec'h oa o galloud, pelec'h o gurunou ?

MARSIAN

Mæs eur maro mézuz, eur maro ar c'hria,
O preg ken divergont hani glaskit eta ?
Zonjit mad : Urz am euz aberz an Impalaër,
Da lakât d'ar maro e kreiz tourmanchou terr
Kement den a zeufé da zisprij hon douéed.

BARBON

Oh ! me oar . an dud goan ganoc'h a ve pleget,
Ho kalloud, hoc'h izign a implijit bemde
Da sponta tudou koz, merc'hed ha bugale,
Holl ar re ne dint ket ampart d'en em zifen :
Nitra na vir diouzc'h, na daélou, na peden.
Ah ! hor c'horf a zo d'oc'h : Reit d'han eur maro kri,
Mæs hon ene bepret a vo trec'h d'ho peli.
Ia, lammit diganomp hon buhe ken sklabuz,
C'hui a zigoro d'imp dor ar vuhez eüruz
E-lec'h e vo torret holl c'hoant hor c'harante,
E-lec'h da virviken e welimp hon Doné.

MARSIAN

Dizuj oc'h diouz Sesar mar ne zentit diouzin,
Beteg é Vajeste 'zav an dinac'h groet d'in.

BARBON

Ar wirione 'laran, ar wirione, mechans,
Ne dle bout evidoc'n na 'vit den dismégans.
Kert arog, ô Barner, greit hardiz ho labour,
Mignoned hon Doué n'emant ket dizikour.
Ma holl fianz enhan me am euz plasset don
Ha pa rankin gouzany hen rey d'in nerz-kalon.

MARSIAN

Plac'h iaouank, ar maro ne zeu ket d'ho sponta ?

BARBON

Douja 'ran ma Doué, na zoujan ken nitra !

MARSIAN

Diualit, rak ganoc'h pe dol-chans vo zouez
Pa vefet e krogad gant poaniou didruez.
Fougéal a zo mad, mæs breman ni welo
Ho pennad trê d'ar fin hag hen a gendalc'ho ?..

(D'ar zoudardet :)

Lammit-hi doc'h ama. —

(D'ar bourrêo :)

Bourrêo, gra da zeyer,

Peguir en em aheurt eneb d'an Impalaër.

(Ar soudardet a stlej Barbon a zirag ar lezvarn
hag hi laka etre daouarn ar bourrêo.)

V Diviz.

MARSIAN ha DIOSCOR

DIOSCOR (o tigouezout endro)

Trec'het oc'h, Gouarner, vel ma 'z oun bet ive,
Kollet hor beuz ganthi an eil hag egile.

MARSIAN (gant desped)

Amzer zo, Dioscor ; an tourmanchou, me gred,
O pist ga hé c'horf rey furnez d'he spered :
Hep dale hi guelimp, soupleet he santimant,
Ha digant-hi hor ho kement zo en hor c'hoant.

DIOSCOR

Plijet gant hon douéed a c'hoarn ar c'halonou
Ec'h errufê da wir peñ a larit, Autrou !

Trived Arvest

Barbon a zo en eur prisoun. Daoulinet eo, he daouarn
e kroaz hag he daoulagad varzu an env. Zeblantout a
ra gwelet traou kaër-meurbed ha bout evel dudiet.
Eun neuz-peden a weler war he muzellou. Eur c'hân
melodiu a glever a vare da vare, kân hag a dav pa
gomz Barbon. Ar c'han-se zo dous da gentan egiz pa
veffê pell, — krenvoc'h eur poulzadik goude, — dous-
sôc'h endro war an echumant.

EUR VOEZ MELODIUZ

(Ton : Koumoulennig gwen-kân.)

Baradoz kaër, o ma gwir vro,
Pell diouzoc'h piou na hirvoudo ?
N'euz nitra er bed ankeniuz
A rentfê ma c'halon eüruz.

EUR C'HËUR A VOEZIOU

Doué karet, Doué ken mad,
Galvit Barbon ganoc'h timad :
N'euz nemedoc'h-hu ho-unan
A raffê joa hec'h ené glan.

BARBON (dudiet.)

Evidoc'h, ma Doue, er lezvarn ez oun bet,
Dre zaouarn ar bourrêo ez oun bet tourmantet :
Dre ma voan ken iaouank en noa zonjet Marsian
E vizen trec'het œz hag e vizen bet goan.
Mil bennoz d'oc'h, Jezuz : Dre an nerz euz ho prec'h
Epad an holl stourmad emoun chomet didrec'h.

Demeuz ho poañjou d'in ho peuz roet eun tanvad,
Ah ! penaus, paourezik, larin d'oc'h ma grat-vad ?
Penaus dre ma chomzou meuli ho trugarez ?
Re simpl oun, siouaz d'in ! red vê teod an Elez,
Mæs, kreiz ar levenez hag ar peuc'h ho kariz,
Muioc'h c'hoaz ho karan er prizoun-ma ken striz :

EUR VOEZ MELODIUZ

En env, n'euz mui glac'har na poan,
Evel ma kavomp er bed-man :
Eno e kreiz ar sklerijen
Am bo ar gaëran gurunen.

AR C'HÈUR

Doue ken mad, Doue karet
D'hi gervel na zalët ket :
N'euz nemedoc'h-hu ho-unan,
A raffê joa hec'h ine glan.

BARBON (*bepret dudiet*)

Dougen gant ma Jezuz eul loden euz é groaz,
O na douster hep par n'am oa zantet biskoaz !
E-tal ar bonheur-men pegen trist ha goular
Vê an holl blijadur a ginnik an douar !
Ma Jezuz, var ho lerc'h noz-dê e hirvoudan,
Mall am euz d'ho kulet, dre hirraz e semplan ;
Da biou ken nemed d'oc'h larin ma c'harante ?
Ma lezit dont dat-oc'h, reit eskel d'am iné,
Evit nijal d'an erv, da vro gaër an Eled,
E-lec'h gant nitra mui na vimp dispartiet.

EUR VOEZ MELODIUZ

En env ar joa 'bado ato,
Kaon ha daëlou vo èet d'o zro :

Eno Doue d'ar re hen kar,
A ziskoez é c'hened dispar.

AR C'HÈUR

Doue ken mad, Doue karet,
D'hi gervel... etc., etc.

BARBON

(Echuet eo hé dudi ; hi a zav en eur laret :)

Mæs petra zo breman, petra 'ta zo digouet ?
Nan euz mui dre ma c'horf gouli na droug ebet.
O dudi euz an env, ma spered oa ganoc'h,
Ha ma c'horf dre vuzud n'eo bet biskoaz iac'hoc'h.
Ia, rentet oun paré, na 'm euz mui eur c'hleien,
O Jezuz, c'hui zo mad ! m'ho meulo da viken.

(Klevet a reer ar c'hân o pellât.)

EUR VOEZ MELODIUZ

Doué, m'ho klef buz va gervel !
Kenavo, trubuilh ha drével !
Kenavo, traonien an daëlou !
M'ho tilez 'vit an holl vadou.

EUR C'HÈUR

Doue karet, Doue ken mad,
Galvit Barbon dat-oc'h timad :
C'hui hepken, ia ! C'hui ho-unan
A rey holl joa hec'h iné glan.



Pevarved Arvest

Diviz

MARSIAN, azéet war gador ar lezvarn ; Soudardet ;
Porzer ar prizoun ; Ar Bourréo.

MARSIAN (*d'ar porzer*)

Na petra lares-te ? He gouliou zo pare ?

AR PORZER

Ia, Autrou Gouarner, n'hé deuz mui merch diouté,

MARSIAN

Setu eun dra iskiz !

(*D'ar bourréo :*)

Te, lar d'in hep distro

E pe stad hi lezout ?

AR BOURRÊO

Autrou, kazi maro !

MARSIAN

Te 'c'heuz hi espernet, faënnnek ma zo diouzið,
Hep göber da labour e zonjes-te gounid ?...

AR BOURRÊO

Ne gredit ket, Autrou, am beffe bet true,
Me zo den a vécher ha n'oun ket didalve : [mank].
M'hen tou ! deuz ma zu-men n'euz ket distera
Gant korennou klaoiek 'rogiz d'ar verc'h iaouank
Hec'hröc'hen 'hed hé c'horf : kement strinke ar goad
Ma oa didan ma zreid war 'r leurzi eur poullad.

Gant kribinou houarn e tispenniz ive
Hec'h izili tener an eil goud' egile.
Hi, ken dous hag eun oan, hi zalc'hé da bedi,
Ha koulskoude ne oa nemed goad ha gouli,
Ha gant eur voézik flour hi laré : ma Doue,
Pardonit d'am bourréo, dioutan ho pet true.
He diouchod, diarog flam evel diou rozen,
Abarz ma echuiz, evel erc'h oa deut guen.
Eun 'töl bennag muioc'h, ha zur didan ma dorn
N'am mize kavet mui nemed he c'horf ien-skorn.

MARSIAN

Iskiz pe iskisoc'h ; mæs pe seurt binvijou
A teuz c'hoaz da implij evit an tourmanchou ?

AR BOURRÊO

Ar guellan choaj, Autrou, m'hen lar e guirione,
Da zistruj hep troidel ar ouen vil, ar lorgnez
Eus ar gristenien-se gant an holl milligét.
Bet oun bet er c'hovel, en deiou tremenet,
Oc'h ober eur lemmig d'am oustilhou merglet,
Drem ha kil e luc'hont egiz re neo-forjet.

MARSIAN

Ro peuc'h, baltek ma'z oud : lar d'in hep fougerez
Hano da venvijou ha zerr da glokerez.

AR BOURRÊO

A galon vad, Autrou : Bout am euz da gentan
Eur c'hrill evit glaou-tan demeuz ar re goantan ;
Meur a billik-arem, meur a véel koëvr-melen
Frank, e kreiz an ioul berf da zigemer eun den.
Bout am euz loaïou stæn da doll berradou plom

En diouskoarn, en difroen, er ginou lom-ha-lom ;
 Ouspen-se eur stern-koat da zisklons izili ;
 Karkannou gant broudou en diabarz da grogi ;
 Brechad ha krogou dir da zigor ar goazied,
 Da zispen tam-ha-tam holl ar c'horf en é hed.
 Bout am euz c'hoaz erfin kiviou ha gennou,
 Hachou ha klezeier, kountilli ha birou.
 Breman, pa blijio d'oc'h, greit Autrou Gouarnour,
 Greit ho choaj en o mesk, ha kemennit labour.

MARSIAN

Awalc'h, loen goue, awalc'h, ha dalc'h da c'hinou^[kloz]
 Ne flaich ket, dioual mat, kent na larin ma foz.

(D'ar zoudardet ;)

C'hui, dirag ar lezvarn, kerc'hit ar gristenien.

(E-unan :)

Hast am euz da gavout eur bannik sklerijen :
 Pegiz e kredin-me d'ar gouliou paréet,
 Nemed hag eur zorser o 'deffe louzaouet ?...
 Eur zorzer, eur pôtr fin, hardissoc'h 'vit ré-all,
 Hag a zonz n'ouzon ket ar c'hoari mouchik-dall !

II Diviz

Ar memez re ; Kristenien chadennet ; BARBON zo er
 penn-kentan, éréet he daouarn ; Zoudardet.

MARSIAN (*da Varbon :*)

Eurburzud, plac'h iaouank, o deuz groethon douéed
 (O hano e pep lec'h da vout ato meulet !)
 Ho memprou zo pare dre o galloud hepken,
 Ha nan, 'vel ma kreder, dre nerz eur louzaouen.

Æz eo dre gement-se kompren o madelez,
 Hag ar zoursi o deuz da viret ho puez ;
 Petra ne rafent c'hoaz evit ho eürusted,
 Mar tistrofec'h outê hokalon, ho spered ?
 N'oc'h ket 'méz a dermen : Nac'hit ar feiz gristen,
 Zentit prim ouz Sesar ha plegit d'é lezen :
 Raktal e vo torret ho ch-dennou pouner,
 Hag ho kalon e trid. ec'h ieffet libr d'ar gêr.

BARBON

Salokras, ô Barner, c'hui a zo e fazi,
 Pe deuz ar wirione n'ho peuz ket a zoursi.
 A holl vlessou ma c'horf mar doun bet guellaët,
 Kement-se, adrazur, a zaill dreist d'ho touéed ;
 Douéed truilhek ma 'z int petra c'hellfent gober ?
 N'int ket mestr d'eun delien o nijal dre an ær :
 Priz o danve o deuz, priz ar c'hoat, ar metal,
 Talvoudégez ebet n'o deuz ken a-hend-all.
 Teod o deuz ha diouskoarn, treid, daouarn,
 [daoulagad.]

Hag int dall, bouar, mud ha na flaichont takad :
 Pegiz o deffe 'ta roët d'in ar paréans,
 Dinerz ma 'z int, ha me o rei d'hê disprijans ? —
 Nan ! Nan ! n'eo ket int sur o deuz groët ar burzud,
 Ho touéou dic'halloud, bouar ha dall ha mud.
 Jezuz-Krist hani eo, Jezuz-Krist ma Doue,
 A zo deut é-unan d'am zikour dre drue :
 Hen 'noa va c'hennerzet e-kreiz an tourmanchou,
 Hen an neuz, en eun tôl, rentet iac'h va gouliou.
 War é c'hras e fiann trê d'am heur diwezan,
 Ha stard e vinn em feiz daoust d'ar poaniou krian.

MARSIAN

Ouzoc'h am euz true, ha c'hui zeu d'am goapât !
O chom d'oc'h aspedi n'oun-me ket ouspen mad ?
Bremen e chanjimp mod : guelet a rimp ember
Mar ne blegec'h dre haeg pa ne rit ket dre gaër.

(D'ar bourrêo :)

Klef, bourrêo ; sav eur peûl, ellum ar flammou-tan.

(Da Varbon :)

Eur vech c'hoaz, plac'h iaouank, arok n'ho peffe
Zentit diouzon, m'ho ped, enorit an douëd :
Dirag tôl ar maro ken-se na derfec'h ket.

[poan.

BARBON

Ma c'homz ho peuz klevet : Me a zo kristenez,
Ha kristenez fell d'in echui ma buhez !
Peûliou na flammou-tan nag eur maro skrijuz,
Nitra ne rey d'in-me nac'h ma Zalver Jezuz :
Hen zo d'in ha me d'han ! Nag eüruz vo an de
Ma roïn d'han ma goad 'vel merch a garante !

MARSIAN

Holl ho peuz hi c'hlevet, ha n'euz ket a zoutanz,
Ne brij ket d'hon douéou kinnig eur greun ejans ;
Ne c'houll ket, aheurtet m'az eo he santimant,
Plega d'an Impalaër, d'éurzou rei assant.
E-léal, larit d'in mar n'euz ket meritet
Eur maro rust ha pront dre boaniou diremed ? —

Ar soudardet, ar bourrêo, etc.

Ia ! Autrou Gouarner, barnet eo e-léal :
D'ar maro ! d'ar maro ! hi kouls hag ar ré-all

A zinac'h eveldei henor, sujedigez
D'an douéou, hor mistri, a garimp da jamez.

MARSIAN

Ouz ar peûl, ô bourrêo, stag anhei hep dale ;
Dispen d'ei he bruched ha dêv he daougoste.

MARSIAN (*d'ar gristenien-aïl*)

Na c'hui, ho fals-kreden derc'hel rit d'hé anzaos ?

AR GRISTENIEN

Ia, da lezen Jezuz ni vo fidel atao :
Bout kristenien, setu hon enor ar brassa !

MARSIAN (*gant kounar*)

Etre daou, greit ho choaj : Pe mervel, pe plega.

AR GRISTENIEN

N'horbeuz mestr'meit Doué : d'han hepken e toujimp
Ha laouen, pa vo red, evit-han e vârvimp.

MARSIAN

Peguir hi goulennit, me rey d'oc'h ar joa-se.

(D'ar soudardet :)

Renit-hê d'ar bourrêo, lammit-hê ac'han-se.

Pempved Arvest

I Diviz

EUR C'HÆUR A GANERIEN

(ton : *Stourm an Tregont*)

Adreon, Satan ; Adreon ar bed
Gant ho lorberez milliget !
Kanomp, kanomp : Ni zo kristen,
Doue vo hor mestr da viken !

EUR C'HANER (*e-unan*)

Dre eur choaj leun a drugare
Emoun e renk e vugale ;
Ma dever eo beza fidel
D'am feiz, d'am fromessou zantel.

AR C'HÆUR

Adreon, Satan, etc., etc.

EUR C'HANER

Ra zeufint an Droug-sperejou
D'am sponta dre o gourdrouzou :
Ne yinn ket guelet o c'hoannât,
Zonn e savinn ma fenn dalc'hmad.

AR C'HÆUR

Adreon, Satan, etc., etc.

EUR C'HANER

Dreist holl trubuilhou ar bed-man,
Me wel an termen diwezan,

An divez zo goest d'am zouten :
E dorn Jezuz — ma c'hurunen !

AR C'HÆUR

Adreon, Satan, Adreon ar bed,
etc., etc.

II Diviz

Ar ganerien. — Afra oc'h erruout gant prez hag an
dizesper war he bizaj. — Eur c'hristen.

AFRA

O glac'har ! rak deut int da lemel diganin
Ar verc'hig ken habask, ken mad ha ken lirin
A vuiskelliz kroëdur, a vagiz iaouank-flam
Hag a gariz evel pa vizen he guir-mam.
O Barbon, ma mestrez, koantoc'h 'vit ar stered,
Perag, 'lec'h ho kemer, n'o deuz ket ma lazet ?
O merc'hig ken karet, petra vo diouzon-me
Pa n'ho kuelin ket mui, c'hui holl joa ma ene ?

AR C'HRISTEN

'N em gonfortit, Afra : Eüruz eo an hani
A ra d'oc'h skuilh daëlou ha kement hirvoudi :
Ar bed-men re stlabuz n'oa ket dign d'hi dougen,
Eet eo d'ar baradoz evel eur goulmik wen.

AFRA

Larit d'in, hep distro, ha guir eo kement-se ?

AR C'HRISTEN

Ia, nê garann laret nemed ar wirione :
An Doué ne drompl ket a zo hon Doué-ni,

Digantan e c'houzomp pezh zo mad pe fazi ;
 Hen an neuz desket d'imp n'emoump laket er bed
 Nemed d'hen zervija, d'hen anaout, d'her c'haret.
 Na petra hor buhe ? Eun amprout groet founuz,
 Eur brezel pemdéiek mæs dibod hirbaduz :
 Doue, deuz lein an env, ema troet e zell
 War é zervijerien, é vignoned fidel ;
 Da bep-hini anhê, pa vo deut an termen,
 Erey joa warlerc'h poen ha peuc'h warlerc'h anken.

AFRA

O komzou ra zouster konfortus d'ar galon,
 Mar c'hellfen dizonjal na welin mui Barbon !

AR C'HRISTEN

Evidoump, kristenien, petra vè ar maro ?
 Dilezel eur prizoun evit mont d'hon guir-bro,
 Dilezel an daêlou evit ar joatisted,
 Hag an dristidigez evit an eürqsted.
 Ni 'doll pell pep glac'har hag an dillad kanvuz
 Pa welomp kenvreudeur o vervel 'vit Jezuz :
 Arok pell o c'havimp endro kichen Doue,
 Hag eur vech unanet, n'en em gollimp morse.

AFRA

Ha me, da vont d'an env, fianz am bê ivez ?

AR C'HRISTEN

Mâr kerit, ô Afra, ia, kement-se vo æz :
 Kredit e Jezuz-Krist ha heuillit é lezen,
 Dre zour ar vadiziant hoc'h iné a zei gwen.
 Setu an hent war-eün da vont d'ar baradoz,
 D'ar lec'h a sklerijen, a zudi, a repoz,

D'ar lec'h ema Barbon ho mestrez ken karet
 O kanveuli Doue gant ar zent, an Eled !

III Diviz.

Ar memez personnachou. Eur pôtr a bemzek vloa a
 zired, kazi-kollet gantan, é halan.

AR POTR IAOUANK

Ar victor, ma breudeur, ar victor a zo d'ê !

AN OLL GRISTENIEN

Petra embannit-hu ? pe seurt kêlou neve ?

AR POTR

Groet eo ar sakrifiz : D'ar maro int laket,
 E renk ar verzerien e veint holl enoret.

AR GRISTENIEN

Mil behnoz da Zoué ! Meulodi d'an holl zent !

AR PÔTR

Na kaër oant da welet d'an douar pa gouezent,
 An eil goud' egilê skoêet gant ar bourrêo,
 Ar pardon war o zéod hag o bizach ken drêo !
 Lampat ra ma c'halon, tridal ra ma ene :
 Ar maro o deuz bet a c'hoantêan ive.

EUR C'HRISTEN

Komzit d'imp eus Barbon, merc'h zantel Dïoscor ;
 Hé feiz, hé nerz-kalon a oa dreist pep enor.

AR PÔTR

Ah ! Barbon a zo bet dreist-holl ar vaillant,an,
 Hi he deuz gounéet ar gurunen gaëran !
 Egiz mont d'eur banked e kerze d'an tourmant :
 Kredet ho pize bet ouz hi gulet ken drant,
 He daoulagad stennet war vaout glaz an envou,
 Hag eur musc'hoarzik dous war rez he muzellou,
 Penaus e spermette meur a vanden Eled,
 Deuet d'hi diarben euz palez an Drinted.
 P'erruaz en dachen eus he merzerinti,
 War he daoulin kentiz hi goueaz da bedi,
 Hag, he daouarn e kroaz, a laraz evellen :
 « O ! ma Zalver Jezuz, bezit c'hoaz ma zouten !
 » Enoc'h am euz fiet, enoc'h ec'h esperan,
 » Rak dreist kement a zo, goût a rit, ho karan.
 » Hirio 'ta vo an de ma iefin-me dat-oc'h.
 » O nag eüruz oun-me da vervel evidoc'h ! —
 » Kemerit, ô Jezuz, ma goad ha ma buhe,
 » Rak etre ho tiouvrec'h e kouskan ma ine. »
 — Pep-unan a c'hoëlé, den mui ne larê grik,
 Hag ar bourrêo zoken oa tenereet gozik,
 Ar bourrêo hag an noa disroget he c'halon,
 Krioc'h 'vit ar bleiji a guz er c'hoajou don,
 Ar bourrêo hag an noa essaëet dre an tan
 Rosta dirag ar bobl he daou goste ken glan ;
 Mæs Doue, dre vuzud, a viraz vije groet
 Eun dismegans ken braz, ken mezuz d'heguerc'hted.
 — « Na chom ket da dermal hag echuomp buan ! »
 Eme souden eur voéz, — siouaz ! hani Marsian.
 — « Ia ! d'ar c'hentan guellan echuomp an affer ! »
 E iudaz c'hoaz raktal eun den-all gant koler.
 Dïoscor, tad Barbon, Dïoscor é-unan,

N é galon an arraj, 'n é zaoulaged an tan,
 Dïoscor an difeiz (piou biken a gredo ?)
 A c'houllê deuz é zorn rei d'é verc'h ar maro.

AFRA

O na den digalon ! Na petra glevan-me ?

AR POTR

Eus daouarn ar bourrêo hen lammaz ar c'hlenze,
 Ha dioustu penn Barbon a ruillaz er bouldren
 Distaget eus he c'horf dre nerz eun tól hepken.

AFRA

O na tad dinatur goassoc'h 'vit an tigred !

AR POTR

Eun hobi a herriz respontaz d'an torfed :
 Kristenien, paianed, holl ar bobl a-unan
 A rê skler da goupren an heñz an noa dioutan.
 Mæs Doue a zeuaz da ziskoez ouспен-se
 Pegement oa terret dré ar c'hrim horrubl-se.
 Da gastiza 'r muntren na c'hortoaz ket pell :
 Epad ma iê d'an env ene hor c'hoar zantel,
 Eun tól-gurun spontuz, daoust ne oa ket arneu,
 A lazaz Dïoscor, hen lakaz e ludu ;
 Ar gouarner Marsian, diskaret war an dro,
 Dre ar memez goalen voa tizet d'ar maro :
 Ho restou, tra iskiz ! a oue skubet en ær
 Dre eur gaouad-avel a droublaz an amzer.

EUR C'HRISTEN

Gloar, enor da Jezus, hor Zalver, hor Roué !
 Ra vevimp, ra varvimp fidel d'é garante,

Evit ma c'hounefemp en envou bep a dron,
Ha ma vezimp, eun de, kichen hor c'hoar Barbon !

AFRA (*var he daoulin*)

Doue ma merc'hig-me, mestr an env, an douar,
Me gred d'oc'h, m'ho ador, me ho meul hag ho kar :
Azalek an heur-man emoun eur gristenez,
Trê da zê ma zremen vinn ho servijerez !

IV Diviz

Eur c'hân evit echui, kân a enor da Santez Barbon.
Ar c'hoarieren o deuz en o daouarn bep a vod laure
pe bep a elestren, evit skeudenni victor ar verzerez.

DISKAN

Barbon, c'hui zo eüruz !

1. Barbon, c'hui zo eüruz,
Braz eo bet ho poaniou,
Mæs breman en envou
Ho poneur vo paduz.
2. Barbon, c'hui zo eüruz,
Ni ro d'oc'h mil enor ;
C'hui 'peuz ar guir denzor
Dre ho nerz burzuduz,
Barbon, c'hui zo eüruz !

3. Barbon, c'hui zo eüruz,
Dre ho maro zantel
Ho magerez fidel
Zo gouneet da Jezuz !
4. Barbon, c'hui zo eüruz,
Dre ho koad pur skuilhet
Satan zo diskaret
Hag ar feiz gloriuz !
5. Barbon, c'hui zo eüruz,
Ar maro n'ho spont ket
Rak c'hui wel dreist ar bed
An dudi peurbaduz !
6. Barbon, c'hui zo eüruz,
Bet zonj euz ho preudeur :
Pegoulz e tei an heur
M'ho kuelimp gant Jezuz ?
7. Barbon, c'hui zo eüruz,
Dalc'hrad hon zikouret
Gant aoun na vemp trec'het
En hor brezel rec'huz !
8. Barbon, c'hui zo eüruz,
Ra vimp-ni, Bretoned,
Gwir gristenien bepret
'Veldoc'h — holl da Jezuz !
'Veldoc'h — holl da Jezuz !



GOUEL SANTEZ BARBON

En enor d'ar pevar kantved eus dedi hé chapel e
parrez ar Faouët (Eskopti Guened), d'ar 7 a viz
Gouere 1889

WAR DON : *Guerz Santez Azenor*

AR BARZ

— Na piou diouzoc'h-hu a zo bet — disul
E Santez-Barbon Ar Faouët,
Eur chapel war eur mène braz
Zavet aboue pevar c'hant vloaz ? —

AR BARDONNERIEN

— Ni zo bet e Santez-Barbon — ni holl
Hag hor beuz gwelet eur pardon,
Eur pardon seurt na welimp mui :
Penaus gober é veulodi ? —

Pedet e oa bet tud ar vro — pedet
Da zont euz seiz lêo tro-var-dro,
Da zont gant kroaziou ha banniel
A bep parrez d'ar lec'h zantel.

— 79 —

Pep parrez erruaz séven — d'he zro,
E pen ar bobl ar veleien :
'Pad ouspen diw heur an ingroez
Ne héanaz mont d'ar menez.

Goagou ar mor ho peuz gwelet — en od,
Goagou warlerc'h goagou bepret,
Setu pegiz e tirede
An eil rumm tud goud' egile.

Da gement a bardonerien — re striz
E oa pep hent, bep guenojen :
Pignet gantê 'lein ar mene,
Oant ugent mil, mui martreze.

Holl e kanent, ma oa dudi — klevet,
Kanennou leun a velodi,
Holl e kanent a greiz kalon
Meuleudiu santez Barbon.

Tregarn a rê ken skiltr ar c'hân — a-hed
Stankou Keroc'h ha Barrégan !
Ar vugale gant o mammou
C'houllê hen oa kê an envou !

Holl e kanent, holl e pedent — devot
Ha doujuz ouspen e kerzent
Da heul kroaziou ha bannielou
Lintruz en ær dreist d'ar pennou.

'Vel n'oa ket frankiz er chapel — d'ar bobl,
Eun auter oa ranket zevel

War eur zao-plench, fas an heol splan,
E beg ar méne war ar lann.

'Tro d'an auter pinvik, kempen — an holl
Oa dastumet 'leiz an dachen,
Stard ha stank evel d'an hanvou
An torc'had-ed 'barz ar parkou.

Bannielou ha kroaziou arc'hant — savet,
'Tro d'an auter, uhel ha koant
E strilhe o lufr, o gened
Ken oa hor zellou brumenet.

Daou eskob, kenvroïdi kez — o daou,
Eskob Guened hag hani Sééz (1)
O doa prijet dont eus a bell
Evit ober lidou ar gouel.

O daouarn 'trezek an envou — zavent,
Ha pa skuilhent o bennoziou,
Braz ha bihan 'blegê o fenn
'Vel bleñn glebet gant ar c'hlizen.

Tost endro d'an daou Bastor mad — tolpet
'N em zalc'hê war meur a renkad
Kloër eleiz ha beleien,
Henvel ouz kœuriou Eled guen.

(1). An Autrou Bécél, Escop Guened, hag an Autrou
Trégaro, Escop Sééz.

D'ar prôn eus an oferen-bred — setu
An holl o deuz souden tavet :
Ken trouz nemed hiboud ar ster
Trec'het dre vouéz ar prezeger !

Eur mestr-prezeger, ha gouiziek — erfad
En hor iez koz ar brezonek :
E gomzou lemm 'vel eur c'hlenze
A verkê don war an ene ! — (1)

Ken kaër pe gaëroc'h ar lidou — kredit
En oferen, er gousperou,
Ma lare an holl : Nan, morse
N'ez euz bet guelet gouel seurt-se !

Pep parrez e prosesion — oa deut
Da vintin seven d'ar pardon,
Ha pep parrez d'an abardaë
A yas devot d'ar gær ive.

Setu pegiz e tremenaz — disul
Ar pevar kantved, ar gouel braz,
E Santez-Barbon ar Faouët,
A viz gouëre d'an dë seizved.

Eur guir Vreton na vize bet — oh ! nan,
Neb en dijê sé-holl gwelet
Ha miret goueled é galon
Ien e-kenver santez Barbon ! —

(1) An autrou Kerdaffrec, arc'h-beleg Pôndivy.

AR BARZ

— Kaër oa ar gouel, ma c'henvroiz, — M'ho
C'hui zo kaër ivez en ho feiz, [kred],
Pa'z it da rei kement enor
D'ar Zent a garomp en Arvor !

E-toues ar Zent-se a garit-bepret,
Ha ken doujuz a enorit,
Bezit fidel a wir-galon
D'an itron vad santez Barbon.

Dre he c'harante birvidik — oé bet
Holl da Zoue a vihanik ;
Guell e oa bet ganthi mervel
Kentoc'h eget hen dilezel.

Merzerez ha guerc'hez ive — hi 'neuz
Galloud en env aberz Doue,
Eur galloud braz evit distrei
Pep seurt goalennou prest d'hon skoei.

Ar maro-trum a vê doujet — dalc'h-mad
Kouls hag an arneu dirollet,
Ken spontuz eo c'hoaz an tan-goal :
Pegiz diouthê bout war zioual ?

Pa vempen acun hag en droublans, — seul-vech
Da santez Barbon gant fian
Kassomp eur beden vad founuz ;
D'hor miret hi vo soursiuz.

Pell-zo hi wel 'n hé fardoniou — bep bloa
Tud Breiz-izel a vandennou,
'Tro d'he fæten, 'tro d'he chapel,
O c'houlén zikour ha skoazel.

Chelaou a ra ar pedennou — a zav
Etrezek he zrôn d'an envou,
Gant zon he c'hloc'h brallet herruz
Ha trouz an Ellé klemvanuz.

Mæs eun dra c'hoas a blijfê d'ei — d'am zonz,
Dreist pedennou, dreist meulodi :
Guelet en hé fardonerien
Ar c'hoant da vout guir gristenien !

Guir gristenien, o ine glan — ampart
Pa vé red gouren diouz Satan,
Kristenien zoun, feal ato
Da Zoue beteg ar maro !



PARDON SANTEZ BARBON

E-kreiz an haon.

Ton : *Fantik.*

I.

Na gån ket c'hoas ar c'hog ha n'è ket goulou-dë,
Kloc'h braz Santez Barbon a vrall war ar miné :
Laret a ra sklentinn d'an dud eo mall tostât,
Pe ba'n ofern getan n'erruent ket avad.

Hiriw ema pardon patronez ar Faouët,
Eus a dost hag a bell e teuer d'hi gueleit
En he chapel mein-dailh e rec'hier Marek-Bran,
Eur burzud a chapel mar zo dre Vreiz unan.

Skoachet e pleg eur roc'h diouz kostez ar miné
Ha kuzet en deliou evel neiz eun evn-goué,
Noz-de ar ster Ellé a gas boubouilh he dour
Beteg-hi deuz ar stank 'vel eur gannaouen flour.

En diabarz 'weler war guer ha magoriou
Buhe ar verzerez kouls hag he burzudou ;

N'euz ket eur lec'h sioulloc'h, na dreist-holl guell
[choajet]
Da neb a gar pedi 'méz eus trubuilh ar bed.

Mæs d'an devez gouel-man, deuz n'ouzon ped parrez
Eur bobl tud a zired d'enori ar Zantez ;
Leun eo an diou vins mein, leun eo pont Sant-
[Mikel,]
Leun eo an holl henchou a vleni d'ar chapel.

Bep heur, 'hed ar mintin, eun ofern vè laret :
Ar bobl a gresk dalc'h-mad beteg an ofern-bred,
An ingroes a zo stank azalek beg ar lan,
Ken stank ma verv an dud egiz eun tøl guenan.

Neuze 'pad e poaniont kloër ha beleien
Da gana an ofern eus holl nerz o c'horzen,
Seiz ozac'h kalonek, a-dreuz ar bobl fidel,
A jerr eun est arc'hant endro d'ar lec'h zantel.

Na piou vo zouézet ? — Zonj ho peuz holl, me gred,
Pegement an arneu 'pad an haon 'noa trouzet :
Gant aoun eus ar gurun, gant aoun eus an tan-goall
Eleiz o doa pedet ar Zantez d'o dioual.

II

Ah ! tud vad Breiz-Izel, dirag santez Barbon
Na pedennou a feiz a skuillit en deiz-man !
Na piou laro ive pegement a c'hrassou
A rey Doue d'euzhi evit hoc'h ezommou ? —

Setu an Anjélus o son d'an tól kreiste
Hag ar bardonerien 'n em strêv dre ar mine ;
Lod didan ar linser a ia da glask meren,
Lod d'ar c'hæriou tostan, lod-all war ar c'hlazen.

[glaz],
An hêol tom, dreist ar lann, a c'hoarz 'barz an nâbl
Ar levenez a leuc'h war dremm bihan ha braz ;
E pep korn an dachen, oh ! na safar joaiuz !
Evit iaouank ka koz, oh ! na devez euruz !

Kredi rafec'h a-bell klevet kroz ar mor leun
Pa vê gant an tempest kélusket trê d'an deun,
Pe gourdrourz an avel o tremen eur c'hoad don
E-mesk an dêro koz, ar c'hesten hag an ôn.

A dost zo eun tourni gant fleitou, trompilhous
Guerzet d'ar vugale gant mistri ar stâliou ;
Ar re-man hep ehan a hop a bouez o fenn,
Trec'h d'an everien jistr e tâl ar varriken.

An holl botred ampart en em lac'h o chenchet
Euz ar c'hloc'h lardet dec'h gant mein glaz
[bruzunet :]
Ne dal ket da zoudart, n'eo nemed eun den flak
Neb n'eo ket goest ganthan d'ober daou dôl distak.

Eun troc'h merc'hed fichet, fleuren ar iaouankiz,
A ra eur baléad 'vit diskoen o c'hoantiz,
Arok mont d'an dichêol da gomz kaër ha zeven,
Pe da stlapa spillou e toul-tro ar fæten.

Ar beorien o-unan, gouliet, mac'haniet,
A ankoua, eur poulzad, o foaniou diremed :
Kana rant kantikou pe guerzennou santel,
Ha guennegou a gouez a bep tu 'n o skudel.

N'euz 'meit tud diramailh, marfad a Gær Wazi,
Garanet war o fas muzul o zotoni, —
Ar re ze a ra goab, a skrign war ar fæson
Hor beuz-ni d'enori e Breiz hor Zent patron.

III.

Lezomp-t-hê d'ober faë war hon sempladurez
Ha distroomp buan dirag hor patronez :
Tregarn 'ra en draonien trouz an tabourinou
O c'hervel d'an iliz evit ar gousperou.

Ar bobl en em vod c'hoas, evel d'an ofern-bred,
Er-mez ha diabarz d'ar chapel benniget,
Hag an holl a hasped gant fiars ar Zantez
Da doll war bep-hini eur zell a drugarez.

War ziouskoa pôtrede vad, en eur prosesion,
Bremaik vo douget skeuden goant an itron
E-toues kroaziou arc'hant, bannielou alaouret
A ra lufr d'ar goueliou e parrez ar Faouët.

Ar c'hân hag ar muzik an eil goud' egilé
En em respont er stank tro-var-dro d'ar miné,
Hag an holl a-unan o kana, o pedi,
A heuilh santez Barbon gant ar brassan dudi.

Heuilh a rant ar Zantez evit kaout he bennoz
A iei gantê d'ar gaer arok ma vo zerr-noz,
A gassent d'o c'herent, ma vo an tiegez
Diouallet a zarvoud epad holl ar blavez.

Echuet ar pardon, ar c'hloc'h a vrall bepret,
Mæs trist e son breman : klevet anhan laret :
— « Kenavo, bennoz d'oc'h, o kristenien guirion
« A zo bet er miné 'pedi santez Barbon ! » —



Merzerinti santez Barbon a ze bet c'hoariet e
bourc'h Ar Zent, kanton Gourin, d'ar meurz Fask,
14 a viz Ebreul 1903.

Ar c'hoarieren, goazed pe pôtrez iaouank — holl
Zentiz — a oa bet kelennet a zoare meulabl gant an
Autrou Couturier hag an Autrou Gouarin, o daou
beleien er barrez. Stlak-daouarn, stank epad ar myster,
a larê skler d'hê pegement a blijadur a reent d'ar
bobl deuet niveruz d'o guelet eus ar c'heriadennou
tro-war-dro.

An digemer vad, groet da Vyster santez Barbon,
an neuz va aliet da lakât hen moula. E skueriou kaêr
ar Verzeréz-man eus an amzer-goz, meur a lenner a
gavo, d'am zonj, kentel a nerz-kalon hag a basianted
e kreiz trubuilh ha tristidigez an amzer a-vreman.

Laret a rann, gant an esperans vad-se, beach vad
d'am leorik, o vont emesk ma c'henvroiz karet.

F. AR MAY,

beleg.

4 a viz Even 1904.



TAULEN

	Paj.
1. Buhe santez Barbon.....	5
2. Guerz santez Barbon.....	27
3. Merzerinti enoruz santez Barbon, la- keet e brezonek Kerne, myster e pemp arvest.....	37
4. Gouel en enor d'ar bevare kantved a zedi ar chapel.....	78
5. Pardon santez Barbon (er Faouët)...	84

